




**DIAGNOSTIK
STAD AR BREZHONEG
E BRO GERNE
DOARE NEVEZET 2004-2009**

**POL STUDI HA DIORREN
ARSELLVA IMPLIJ AR YEZHOU
2011**

Digoradur

Ur steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg, Brezhoneg 2015, a oa bet savet gant an Ofis e 2003. Diazezet e oa war stad wirion ar yezh a-benn ober kinnigoù uhelek met fetis evit suraat he dazont. Kement ha kinnig ur steuñv pleustrek da vat e oa bet divizet e zisplegañ dre vro¹, anezhi ur vent dereat evit tostaat ouzh gwirvoud an dachenn.

Daou deul a oa bet savet evit pep hini eus an 29 bro zo e Breizh : un diagnostik ha palioù diorren. Kavout a ra deomp eo deuet ar mare da nevezñ ar studiadenn bet savet neuze ha d'ober bilañs an emdroadurioù deuet abaoe. Ra sikouro an diagnostikoù nevez-mañ, savet diwar an holl ditouroù hon eus dastumet hag e darempred gant oberourien pep tachenn, da sevel ur politikerezh yezh efedus.




*Lena Louarn,
Prezidantez Ofis Publik ar Brezhoneg*

¹ Diwar ur genstaged douaroniel, armerzhel, sokial ha/pe sevenadurel eo treset ar broioù bet termenet gant al lezenn “Voynet” e 1999. Ar broioù-se eo ar re a implijer er steuñv-mañ.

Taolenn

Plegenn bro Gerne	4
Sifroù pennañ	5
Dibarderioù ar vro	6
Ar vrezhonegerien.....	6
An deskadurezh	7
Kelenn er skol	8
Kelenn divyezhek.....	8
Kelenn brezhoneg.....	17
An deskadurezh uhel	22
Kelenn	22
Skol-veur Breizh-Izel (SBI)	22
Ar c’helenn d’an oadourien.....	24
Kentelioù noz.....	24
Stajoù	25
Klozadur ar pennad war an deskadurezh	26
Ar bed foran	27
Politikerezh yezh an departamant	28
An doareoù da gemer ar brezhoneg e kont	28
Ar budjed gouestlet d’ar brezhoneg gant an departamant.....	28
Kevrat bro	29
Oberoù ar c’humunioù hag an DPKE	29
Klozadur ar pennad war ar bed foran.....	31
Treuzkas ar yezh	32
Servijoù d’an dud	32
Dudi	33
Buhez speredel.....	34
An embann.....	35
Ar mediaoù	35
Er skinwel	35
Er skingomz	36
Marc’had al labour.....	36
An armerzh	37
Klozadur war ar gevredigezh keodedel.....	39
Klozadur.....	40
Stagadennoù	45
Levrlennadur	48
Mammennoù.....	48


Ar frammoù etrekumunel



Sifroù pennañ

Niver a gumunioù	95
Poblañs hollek e 2005	327 768
Emdroadur ar boblañs etre 1999 ha 2005	+1,7%
Gorread	2 484 km ²
Stankted ar boblañs	132 ann./km ²

Emdroadur ar boblañs etre 1999 ha 2006



Dibarderioù ar vro

Unan eus broioù brasañ Breizh eo (en eil renk emañ, goude bro Kornôg Kreiz-Breizh) hag unan eus ar re bobletañ ivez (goude bro Roazhon, bro Naoned ha bro Vrest). **Ouzhpenn pol Kemper** a zo kreñv war dachenn ar servijoù koulz ha war dachenn al labour ez eus **pevar fol servij** en arvor (Konk-Kerne, Douarnenez, Pont-'n-Abad ha Kemperle) hag ur pol labour gant Kastellin en Norzh.

Fonnusaat a ra kresk ar boblañs abaoe deroù ar bloavezhioù 2000 a-drugarez d'ur ventel enbroañ-divroañ pozitivel. Kreñv eo ar c'hresk en un **takad etre Kemper ha Fouenant**, dreist-holl, tra ma'z eus kornioù all o koll annezidi (ar C'hab ha trowardroioù Skaer peurgetket).

Pourvezet mat eo ar vro gant an holl vodoù treuzdougen ha pa vefe lec'hiet e beg gourenez Breizh. Bro an arvor eo bro Gerne ; gant se eo kreñv enni an obererezhioù a denn d'an touristerezh ha d'ar pesketaerezh (ur c'hard eus pesketaerezh fresk Frañs a dremen dre he forzhioù). Ur pouez dreist zo gant an trede gennad er vro-mañ (war-dro an div drederenn eus an implijoù) : **douget eo hec'h armerzh gant ar servijoù**, hag int liammet ouzh an touristerezh peurgetket.

Un tamm koshoc'h eo poblañs ar vro eget e peurrest Breizh. Hervez an EBSSA e c'hellfe bezañ **war-dro 340 000 annezad e 2015** (+7% e-keñver 2005) ha 355 000 annezad bennak e 2030 (+12% e-keñver 2005), ar pezh a zo un tamm nebeutoc'h eget kresk rannvro Breizh.

Ar vrezhonegerien


Da-geñver niveradeg 1999 e oa bet savet un enklask anvet *Étude de l'histoire familiale* gant an EBSSA. En enklask-se e oa goulennoù a denne d'an ober gant ar yezhoù er gêr. Kadarnaet eo gant ar roadennoù-se e kosha poblañs yezherien kornôg Breizh (ha hini bro Gerne neuze).

Diwar ar sifroù-se, diwar sifroù ar c'helenn divyezhek ha diouzh dibarderioù pep bro ez eus tu da sevel brasjedadennoù war an niver a yezherien e pep takad. E-se e c'hellomp lakaat e oa **war-dro 50 000 brezhoneger o chom e bro Gerne e 1999**, da lavaret eo war-dro **16% eus ar boblañs** (pa save feur Breizh da 6,7%).

Da-heul e c'hellomp brasjediñ ivez e vefe etre **35 000 ha 40 000 yezher e bro Gerne e 2009**, da lavaret eo etre **11 ha 12,5%** eus poblañs ar vro (pa savfe feur Breizh da 5% dre-vras). Un dregantad par da hini bro Brest eo. **Tremen 10 000 yezher a vefe aet d'an anaon** e bro Gerne etre 1999 ha 2009 (da lavaret eo **tremen ur miliad a yezherien bep bloaz**).

An deskadurezh

Kartenn hollek ar c'hinnig kelenn brezhoneg hag e brezhoneg – Bloavezh-skol 2009/2010



E 53 c'humun e kaver da nebeutañ un doare bennak da zeskiñ pe da gaout un tañva d'ar brezhoneg. Tremen an hanter eus kumunioù ar vro ez eont d'ober.

E 91 eus ar 95 kumun a ya d'ober ar vro ez eus ur skol da nebeutañ.

15 anezho a ginnig ar c'helenn divyezhek (5 ouzhpenn e-keñver 2003) ; da lavaret eo n'eo ket ken stank rouedad ar skolioù divyezhek hag e bro Brest, ha pa'z afe war vrasaat er bloavezhioù diwezhañ. A-hend-all ez eus un tañva d'ar yezh er c'hentañ derez e 37 kumun - a-drugarez d'an departamant² - ha kentelioù e skolioù eil derez zo e 18 kumun. A-benn ar fin, kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg zo e **49 c'humun diwar 91** enno ur skol.

E 2009, tremen **5 700 skoliad eus ar vro**³ a heuilh ar c'hentelioù-se eus ar skol-vamm d'al lise, da lavaret eo 9,4% eus ar boblañs-skol (da 6,5% e save ar feur-se e 2003/2004). **Er c'hentañ derez** ez eont d'ober **tost da 13% eus an niver a skolidi**. Feurioù uhel int met dav eo resisaat n'o devez an tri c'hard eus ar 5 700 skoliad-se nemet un tañva d'ar yezh, ha ne ra ket brezhonegerien anezho.

Estregeto e konter **tremen 800 deskad** e-touez an **dud deuet** (stabil e-keñver 2003) : en deskadurezh uhel (71 studier e 2008/2009), dre gentelioù noz (497 deskad e 2009/2010) pe dre stajoù (255 stajiad e 2008/2009).

Dre-vras ez eus **etre 15 hag 20% a zeskidid ouzhpenn e 2009 e-keñver 2003** (6 500 e-skoaz e-tro 5 500). **Muioc'h a skolidi zo er c'helenn divyezhek dreist-holl hag er**

² Harpet bremañ gant kumunioù zo ha gant ar C'huzul-rannvro abaoe 2010.

³ 1 326 en hentadoù divyezhek (e 2009/2010), 2 760 kizidikaet gant an tañva er c'hentañ derez (e 2009/2010) ha 1 640 skoliad gant kentelioù yezh en eil derez (e 2008/2009).


c'hentelioù en **eil derez prevez** ivez ; gant an doareoù all da zeskiñ eo chomet heñvel ar sifroù (digresk zo un tamm eus tu an dud deuet memes tra).

Kelenn da 6 500 den ne dalvez ket e vo kement a yezherien nevez e dibenn ar bloavezh-skol. Diwar munudoù ar sifroù a vo kinniget pelloc'h e c'haller ober brasjedadennoù war an niver a vrezhonegerien ouzhpenn a vije stummet bep bloaz. 40 skolajiad bennak en em gav e trede klas al lec'hioù divyezhek, 50 lisead bennak a dizh ul live yezh uhel a-walc'h er c'hlas termen, 50 den bennak ouzhpenn a dizh liveoù uhelañ ar c'helenn d'an oadourien⁴. Setu, **war-dro 140 brezhoneger bennak a vefe stummet tra ma varv tremen ur miliad a yezherien bep bloaz** : dre se e vefe **ment feur adneveziñ poblañs ar vrezhonegerien tro-dro da 1 evit 7**, da lavaret eo e stummer ur brezhoneger evit seizh a ya d'an anaon.

Kelenn er skol

Kelenn divyezhek

Al lusk digeriñ lec'hioù divyezhek e bro Gerne



Dizingal eo bet al lusk digeriñ lec'hioù divyezhek betek deroù ar bloavezhioù 90 ; ur prantad digeriñ a oa bet etre 1993 ha 2002 hag un eil, kreñvoc'h, abaoe 2005. N'eus bet morse muioc'h eget daou lec'h nevez d'un distro-skol er vro-mañ, ha tremen 300 000 den o chom enni.


➤ Dasparzh ar c'hinnig

E bro Gerne e oa bet digoret unan eus ar skolioù divyezhek kentañ : skol Diwan Kemper a oa bet digoret e 1977. En deskadurezh publik e oa bet digoret al lec'h divyezhek kentañ 12

⁴ An deskidi all a zle bezañ kontet evel danvez yezherien : n'int ket yezherien ampart.

vloaz war-lerc'h, e 1989, e Douarnenez⁵. E Pont-'n-Abad e oa bet digoret lec'h divyezhek kentañ ar skolioù katolik e 1995⁶.

Kinnig kelenn divyezhek er c'hentañ derez – Distro-skol 2009



Daoust d'an digoradurioù zo bet abaoe 2003 (15 kumun pourvezet bremañ e-skoaz 10 e 2003) e chom distank c'hoazh rouedad ar skolioù divyezhek er c'hentañ derez.

Unan eus toleadoù Breizh-Izel m'emañ rouedad ar skolioù divyezhek en he distankañ eo bro Gerne.

Brasoc'h eo ar c'hinnig eget e 2003 memes tra dre ma'z eus bet 7 lec'h digoret ha 5 anezho e kumunioù ma ne oa kinnig ebet (5 DPKE⁷ hep kinnig ebet a gonted e 2003, n'eus ken nemet 2 e 2009). **Gallout a reer bremañ enskrivañ e vogel en un hentad divyezhek e 16,5% eus kumunioù ar vro** dezho ur skol bennak : e-touez an 91 kumun-se ez eus 15 enno ul lec'h divyezhek d'an nebeutañ (5 kumun evit Diwan, 10 evit an hentad publik ha 3 evit an hentad katolik).

Bras eo an diforc'h kinnig etre bro Gerne (1 gumun skoliata diwar 6 pourvezet) ha bro Brest (1 diwar 4). Darn eus an displegadenn eo n'eus nemet 3 lec'h en deskadurezh prevez.

⁵ E 1983 e oa bet diazezet hentad par-ouzh-par an deskadurezh publik.
⁶ E 1990 e oa bet diazezet hentad par-ouzh-par an deskadurezh prevez.
⁷ Diazevadur Publik a Genlabour Etrekumunel (EPCI e galleg).




Er gartenn a-us e teu war wel **tachennoù hep tamm kinnig divyezhek ebet** : KK bro Fouenant, KK bro ar C'hab, arvor ar Porzhe, kornioù all evel Plogastell-Sant-Jermen⁸, Molan, Rosporden, Eliant, Pluguen, Sant-Evarzeg, Rieg, h.a.

A-hend-all, er c'hêrioù brasoc'h eo talvoudusoc'h dielfennañ ar c'hinnig dre garter. E Kemper hag e Douarnenez, n'eus nemet 1 lec'h publik tra ma kaver 2 e Roazhon, e Landerne, en Oriant hag e Gwened. Astennet e c'hallfe bezañ ar c'hinnig e kumunioù evel Kemper, Kemperle, Douarnenez, Pont-'n-Abad ha Kastellin.

Evel m'emañ lusk an digeriñ skolioù bremañ e vo **ur c'hinnig divyezhek en un hanter eus ar c'humunioù skoliata a-benn ar bloavezhioù 2040**.

Kinnig kelenn divyezhek en eil derez – Distro-skol 2009



*E-giz ma c'hoarvez e peurrest Breizh, kalz strishoc'h eo ar c'hinnig en eil derez eget er c'hentañ derez. Gwir-tre eo e bro Gerne m'eo **digresket e-keñver 2003** : serret eo bet an hentadoù a oa anezho da neuze e **Douarnenez, Plozeur ha Pont-'n-Abad evit sevel ur pol e Kemper en deus bet poan o tiorren.***

E 18 kumun e kaver da nebeutañ ur skolaj ; n'eus nemet e Kemper e c'heller kenderc'hel gant ar c'helenn divyezhek.

Evit ar pezh a sell ouzh kenderc'hel el liseoù, un hentad divyezhek publik zo bet digoret e 2006 (e Kemper atav).


⁸ Eno eo bet digoret un hentenn da zistro-skol 2010, dres.

➤ Poblañs deskidi ar c’helenn divyezhek

Gant **1 326 skoliad divyezhek** da zistro-skol 2009 ez eo bro Gerne an 2^l bro bouezusañ goude bro Brest. An 2^l bro m’eo kresket ar muiañ ar sifroù abaoe 2003 eo ivez, goude bro Montroulez. **10,2% eus skolidi divyezhek Breizh zo enskrivet e bro Gerne** (0,5 poent ouzhpenn e-keñver 2003).


Kalz dale zo c’hoazh gant bro Gerne e-keñver bro Brest avat : evit 1 skoliad divyezhek e bro Gerne e konter 2 e bro Brest (tra ma n’eus nemet 20% a skolidi unyezhek ouzhpenn er vrose). Met kreñvoc’h eo emdroadur sifroù bro Gerne abaoe 1999 (er skol-vamm dreist-holl).

Dasparzh ar skolidi divyezhek diouzh o live en tri hentad – Distro-skol 2009



N’eus nemet gant an hentad publik ma c’haller kenderc’hel gant an deskadurezh divyezhek a-hed e amzer-skol (e Kemper).


Dasparzh ar skolidi divyezhek etre an tri hentad etre 2003 ha 2009



*Stag eo lusk diorren an hentad publik ouzh ar skolioù zo bet digoret ingal gantañ e-kerzh ar bloavezhioù diwezhañ. Kresket kalz eo lodenn ar skolioù publik da-heul tra m’eo digresket dregantad ar skolioù dre soubidigezh. Ha pa vefe kresket un tamm e chom gwall vihan perzh ar skolioù prevez gant 9,4% (e-skoaz 34,1% e Breizh) : **muioç’h a skolidi divyezhek zo e skolioù prevez bro Ploermael pe bro Redon eget e bro Gerne.***


Ha pa vefe emdroet ar c'hinnig en deskadurezh katolik abaoe 2003 (trement eo eus 1 lec'h da 3) e chom bihan lodenn ar **skolioù katolik** (14,4% eus skolidi an deskadurezh par-ouzh-par zo skoliataet gant an deskadurezh katolik e-skoaz 30,7% eus poblañs ar skolioù dre-vras). Ur c'hinnig kelenn divyezhek a c'hallfe bezañ e skolioù kumunioù evel Kemperle, Konk-Kerne, Douarnenez ha Fouenant da gentañ, met ivez re an Erge-Vras pe Kastellin.

Emdroadur keñveriet an niver a skolidi divyezhek hag an niver a skolidi en deskadurezh dre-vras eus ar skol-vamm d'al lise etre 1999 ha 2009



Ingol e kresk an niver a skolidi divyezhek (+90,2% etre 1999 ha 2009) tra ma chom kentoc'h stabil sifroù hollad ar skolioù er vro-mañ (-2,9% etre 1999 ha 2009). Heñvel eo e Breizh (+129,8% evit ar c'heleñn divyezhek ha +2,1% evit ar c'heleñn dre-vras). Gwelet a reer ivez war ar grafiek a-us eo tuet krommenn ar c'heleñn divyezhek da sonnaat er bloavezhioù diwezhañ (abaoe 2005 dre-vras) abalamour d'al lec'hioù nevez.


Emdroadur an niver a skolidi divyezhek er 1^{añ} derez etre 1999 ha 2009



Eus ar skol-vamm d'al lise, n'eo ket kresket kement ar sifroù e bro Gerne hag e bro Brest, met sifroù ar skolioù-mamm zo emdroet gwelloc'h e bro Gerne. Amañ eo kreñvoc'h al

lusk bremañ e gwirionez : +9,5% etre 2007 ha 2009⁹ e-keñver +5,5% etre 2000 ha 2006 (eus ar skol-vamm d'al lise).

Emdroadur an niver a skolidi divyezhek stadet e-keñver pal « Brezhoneg 2015 »




Da-geñver savidigezh “Brezhoneg 2015 – Ar steuñv hollek da ziorren ar brezhoneg” gant an Ofis e oa bet termenet paliou bloaziek dre vro evit ma vefe 25 000 skoliad divyezhek e Breizh a-benn 2015. E Breizh emeur 12,6% dindan ar pal bet lakaet evit 2009 ; brasoc’h eo an dale e bro Gerne (19,3%). Evit tizhout **pal an 2 500 skoliad a-benn 2015** ez eus ezhomm eus ur c’hresk bloaziek par da +11% etre 2010 ha 2015 (tra ma save da +9,5% etre 2007 ha 2009).

Evit tizhout ar pal-se ez eus da zigeriñ 2 pe 3 lec’h nevez da bep distro-skol.

➤ Stadegoù

Feur ar c’helenn divyezhek dre live keñveriet gant an departamant ha Breizh – Bloavezh-skol 2008/2009




⁹ +5,6% e Breizh etre 2007 ha 2009.




Izeloc'h eo ar feur skoliata en hentad divyezhek evit pep live kelenn e bro Gerne eget en departamant. Un tamm uheloc'h eget e Breizh eo an dregantadoù memes tra, dreist-holl er skol-gentañ hag er skolaj, met izeloc'h int el **lise.**

Pouez ar c'helelln divyezhek er c'hentañ derez dre vro – Bloavezh-skol 2008/2009



E penn diwezhañ broioù Breizh-Izel emañ bro Gerne evit feur ar c'helelln divyezhek er c'hentañ derez.

Emdroadur stadegoù ar c'helelln divyezhek er c'hentañ derez e bro Gerne, bro Brest, bro Ploermael abaoe 1999




Er stadegoù ez eus ur cheñchamant lusk abaoe 2005 : buanoc'h eo an emdroadur e bro Gerne eget e bro Brest. Un dra vat eo met e Breizh-Izel emañ bepred ar vro er penn diwezhañ



er stadegoù, evel ma oa e 2002/2003. Chomet eo **e-pad pemp bloaz gant ur feur izeloc'h eget bro Ploermael.**


Feur ar c'helenn divyezhek e bro Gerne zo unan eus ar re zo **kresket an nebutañ** abaoe 2003 e Breizh-Izel (ur poent ouzhpenn hepken, n'eus nemet e bro an Oriant hag e bro Gwengamp m'eo kresket nebutoc'h). Diwezhat eo deuet an digoradurioù (7 etre 2005 ha 2009) ha n'o deus ket bet o levezon vrasañ c'hoazh : er bloavezhioù da zont e tlefe ar feur mont war wellaat p'en em zispako betek ar CM2 an hentadoù nevez krouet (ha gant ma vo digoret lec'hioù nevez ingal).

Feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre DPKE – Bloavezh-skol 2008/2009




N'eus DPKE ebet dezhañ ur feur en tu all da 10% padal ez eus 11 anezho e Breizh. Ar vro enni ar muiañ a DPKE dindan 2% eo ivez. Hogen, an takad ma kresk ar buanañ ar feurioù dre DPKE eo.

Feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez dre gumun – Bloavezh-skol 2008/2009



Bihan e chom c'hoazh feur ar c'helenn divyezhek er c'humunioù ma'z eus ur c'hinnig, nemet e Plozeur a gresk ingal abaoe 2004. Hentad Tremeven zo kresket buan-tre ha Plozeved zo war an hent-se ivez. E kumunioù zo eo aet pouez ar c'helenn divyezhek war gil avat (Tregon, Banaleg da skouer) ha splann eo dale kumunioù bras zo : Konk-Kerne, Pont-n-Abad ha Kemperle n'o deus nemet 1 lec'h divyezhek, ar pezh n'eo ket kalz evit kumunioù eus o ment (e Kemper ma'z eo liesseurtoc'h ar c'hinnig eo aet pouez ar c'helenn divyezhek war-raok).

Pouez ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez e Kemper – Bloavezh-skol 2008/2009



Gant 4,6% a skolidi divyezhek er c'hentañ derez ez eo diorroet mat a-walc'h an deskadurezh divyezhek e Kemper e-keñver kêrioù bras all Breizh. Splann eo avat an **digempouez etre an norzh hag ar su**. Uhel eo ar feur skoliata en deskadurezh divyezhek e Kerfeunteun (14,5%), e norzh ar gumun. Bodet eo an tri hentad war un dachenn gwall strizh (ar pezh a gadarna ar soñj e teu muioc'h a dud pa vez stank ar c'hinnig).

An digempouez etre ar c'harterioù a ziskouez ez eus ezhomm da astenn ar c'hinnig ; e norzh an Erge-Vihan, er Bradenn, da skouer. Stadañ a reer ar memes tra er c'humunioù bras all : Douarnenez, Kemperle, Konk-Kerne, h.a.

Kelenn brezhoneg


➤ An tañva er c'hentañ derez

Evit ar skolidi n'int ket skoliataet en hentadoù divyezhek eo an tañva un doare da gaout un darempred gant ar yezh : etre 1 eurvezh ha 3 eurvezh bep sizhun, diouzh ar skol, e pad an abadennoù ma vez kinniget kanaouennoù, rimadelloù, c'hoarioù e brezhoneg ha diazezoù eus ar yezh.

Gant youl ar C'huzul-departamant eo bet diorroet er c'hentañ derez. D'en ober en deus lakaet ur stignad war-sav e skolioù publik dre sinañ un emglev gant an Ensellerezh akademiezh e 2000. Gant ar C'huzul-departamant e vez kemeret goprou an emellerien diavaez e karg. **Mervent** eo ar gevredigezh zo bet kefridiet gant an departamant hag an Ensellerezh akademiezh e bro Gerne.

Skoazellet e veze an tañva er skolioù katolik en un doare heñvel. Gopret e veze an emellerien dre skoaziadennoù roet gant ar C'huzul-departamant dre ar gevredigezh **Yezh ha Sevenadur** a ra al liamm gant DDEC Penn-ar-Bed. Goude un digresk er c'hinnig da zistro-skol 2006 ez eus bet paouezet ganti penn-da-benn e 2007 ; gouestlañ a ra ar gevredigezh he feadra da glokaat endro yezhel an hentad divyezhek prevez gant skoazellerien-vamm brezhonek.

Dasparzh ar skolidi kizidikaet er c'hentañ derez – Bloavezh-skol 2009/2010




Gwellaet eo ar c'hinnig e KK bro Konk-Kerne hag e KK bro Kastellin e-keñver an diagnostik kozh. E 2009/2010 e vez kinniget an tañva e 50 skol publik e 37 kumun.

2760 skoliad zo bet kizidikaet e 2009/2010. **8,7% eus poblañs ar skolioù kentañ derez ez eont d'ober** (ha 12,5% eus skolidi ar skolioù publik e-skoaz 11,7% e 2003). **2 wech diorroetoc'h eo an tañva er skolioù-mamm eget er skolioù-kentañ** : heuliet e vez gant 13,1% eus poblañs skolioù-mamm ar vro (1630 skoliad) e-skoaz 5,8% eus poblañs ar skolioù-kentañ (1130 skoliad).

Ha pa vefe uhel a-walc'h feur ar skolidi kizidikaet e bro Gerne (ur feur kevatal da hini bro Brest, 8,6%), **dindan hini bro Montroulez** emañ (14,9%) ha bro Kornôg Kreiz-Breizh (13,7%).


Lodenn skolidi kentañ derez pep DPKE gant un tañva d'ar brezhoneg – Bloavezh-skol 2009/2010



E lodenn gornôkañ ar vro emañ an tañva en e greñvañ (KK bro Douarnenez, bro ar C'hab ha gorre ar Vro Vigoudenn) ; uhel a-walc'h eo e KK bro Kemperle ivez. En enep, e chom gwall vihan feur a vugale kizidikaet e kreiz ar vro (KTK Kemper-Kumuniezh, KK su ar Vro Vigoudenn, KK Bro-C'hlazig, h.a.).

Merzout a reer eo diorroet an tañva d'ar brezhoneg e lec'hioù ma n'eus kinnig divyezhek ebet a-wechoù (ar C'hab, KK bro Fouenant, arvor ar Porzhe, Molan). Gallout a rafed en em c'houlenn ha ne vefe ket un doare kevezerezh etre an doareoù-se da gelenn brezhoneg, met splann e tiskouez stad ar jeu e lec'h all (bro Brest da skouer) **n'eus ket a gevezerezh** e gwirionez. Er c'hontrol, seul liesseurtoc'h ha stankoc'h e vez ar c'hinnig, seul vui a startijenn a vez gant kelenn ar brezhoneg hag e brezhoneg.

Niver a vugale gant an tañva er c'hentañ derez eus 2004/2005 da 2009/2010



Kentoc'h stabil eo sifroù an tañva abaoe 2004 ; en o uhelañ e oant e 2006 gant tost 3 000 bugel.

E deroù 2007 en doa goulennet ar C'huzul-departamant digant ar c'humunioù paeañ un hanter eus ar frejoù. Er c'humunioù n'o deus ket asantet mont gant an hent-se eo paouezet tamm-ha-tamm an departamant da arc'hantaouiñ an tañva etre distro-skol 2007 hag hini 2009. Un nebeud kantadoù a euroioù e koust d'ur gumun evit ma vefe kinniget 1 eurvezh tañva d'ar brezhoneg a-hed ar bloavezh en ur skol¹⁰.

E Steuñv Diorren Korsika (1993) e oa bet lakaet da bal e vefe teir eurvezh kelenn korseg bep sizhun en holl liveoù eus ar skol-vamm d'al lise. E 2005 ez eus bet stadet gant ar Rektoriezh e oa tizhet 95% eus skolidi kentañ derez Korsika gant kentelioù korseg¹¹. Danvez da brederiañ zo gant ar skouer-se.


➤ Ar c'helenn en eil derez

Kentelioù brezhoneg a vez kinniget er skolaj e stumm abadennoù tañva adalek ar 6^{vet} betek an 3^{de} klas (etre un ha div eurvezh bep sizhun ma vez kelennet diazezoù eus yezh ha sevenadur Breizh). Er 4^{re} hag en 3^{de} klas e c'hell bezañ kinniget evel Yezh Vev pe evel danvez dibab : etre div ha teir eurvezh bep sizhun. E liseoù zo e c'haller dibab ar brezhoneg evel Yezh Vev adalek an eilvet klas betek ar c'hlas termen.

¹⁰ Skoazellet eo ar stignad gant ar C'huzul-rannvro abaoe 2010.

¹¹ En eil derez e save ar feur da 51% er skolaj ha da 21% el lise.

Dasparzh ha niver ar skolidi a gelenner brezhoneg dezho en eil derez – Bloavezh-skol 2009/2010




E 14 eus an 20 skolaj publik hag e 11 eus an 21 skolaj prevez ez eus ur c’hinnig kentelioù brezhoneg (n’eus nemet Ploeneg ha Tregon a zo dibourvez). E-keñver an diagnostik kozh e stader eo emdroet ar gartenn-mañ gant kinnigoù ouzhpenn e skolaj publik Banaleg hag e skolajoù prevez Gwaien ha Pontekroaz. Met serret ez eus bet lec’hioù e skolajoù prevez Banaleg ha Skaer en distro-skol 2009.


1510 skoliad eil derez a heuilh kentelioù brezhoneg e 2009/2010, da lavaret eo 5,3% eus skolidi eil derez ar vro. 89,4% anezho (1350 skoliad) n’o deus nemet un tañva d’ar yezh avat.

Ar vro gentañ war dachenn ar c’helenn brezhoneg en eil derez eo bro Gerne : e-touez skolidi eil derez rannvro Breizh a heuilh seurt kentelioù e konter amañ 19% eus ar re zo enskrivet en deskadurezh publik ha **46,5% eus ar re zo enskrivet er prevez**. Evel-se e oa kont e 2004 dija met kreñvaet eo lañs ar vro war an dachenn-se c’hoazh.

Emdroadur sifroù ar c’helenn brezhoneg en eil derez eus 2004/2005 da 2009/2010



Emdroadur feurioù ar c'helenn brezhoneg en eil derez e bro Gerne eus 2004/2005 da 2009/2010



En desped d'ar pezh a c'hoarvez e Breizh (sifroù kentoc'h stabil abaoe 2003), e kreske sifroù ar c'helenn brezhoneg e bro Gerne betek 2008/2009. Kreskiñ a rae sifroù ar skolajoù **prevez**, dreist-holl, gant un **tañva** roet **d'an holl** en em gav er skolaj (d.l.e. e 6^{vet} pe 6^{vet} ha 5^{vet}). N'eus nemet e Banaleg ma kaver ur c'hinnig heñvel er publik abaoe distro-skol 2008, ar pezh en deus lakaet sifroù an eil derez publik da vont dreist d'ar pezh e oant e 2003 a-benn ar fin. Lieskementet eo ar skolajoù a ro un tañva da holl skolidi rummadoù zo : 3 lec'h a oa e 2004, 9 e 2009. Met un digresk bras zo e sifroù ar skolajoù prevez e 2009/2010 (-99 skolajiad e Douarnenez ha -49 e Pont-'n-Abad dreist-holl).

Dre-vras, **brasaet eo an niver a solidi eil derez kizidikaet met digresket eo an niver a liseidi stummet avat** (116 a oa enskrivet e 2004, ne oant ken nemet 71 e 2009).

Alies eo merket tachenn ar c'helenn brezhoneg gant digempouezioù a bep seurt. N'eo ket ken gwir amañ hag e broioù all met merzout a reer memes tra ez eus dale gant kumunioù zo (Kemperle ha Konk-Kerne da skouer). Tost an div drederenn eus perzhidi ar c'hentelioù brezhoneg zo enskrivet er prevez, ar pezh zo kontrol da zasparzh ar skolidi dre-vras. Digempouez eo an dasparzh etre ar skolajoù hag al liseoù, erfin : er skolaj emañ tremen 95% eus deskidi ar vro. **Danvez da vont war-raok zo c'hoazh.**

Al lec'h a zere da frammañ un eil doare da vont da vrezhoneger

An holl zoareoù da zizoleiñ ar yezh zo bet lakaet da dalvezout e bro Gerne c'hoazh (tañva er skolioù, er skolajoù ha kentelioù yezh en eil derez koulz en deskadurezh publik ha prevez) met n'eus liamm ebet etre an eil hag egile : n'eus kendalc'h ebet eus ar skol-vamm d'al lise. En deskadurezh publik eo kalz gwanoc'h an tañva er skolioù-kentañ eget er skolioù-mamm hag ar c'helenn a vez kinniget adalek ar 6^{vet} n'eo ket aozet evit mont da-heul an tañva-se. Steuziet eo an tañva eus skolioù kentañ derez an deskadurezh prevez tra m'eo diorroet kalz e bloavezhioù kentañ ar skolaj. A-hend-all, gwall vihan eo an niver a dud yaouank a heuilh gwir gentelioù yezh adalek ar 4^e klas ; ar re-se eo o deus ur chañs bennak da dizhout ul live yezh dereat ma kendalc'hfent betek ar vachelouriezh gant o c'hentelioù.

Mat e vefe kenurzhiñ an doareoù-se da gelenn brezhoneg rak un hent all da stummañ yezherien a vefe oc'h aozañ kendalc'h ar c'helenn : tañva er c'hentañ derez hag e 6^{vet}-5^{vet}, kentelioù yezh eus ar 4^e d'ar c'hlas termen. Bro Gerne a vefe al lec'h gwellañ da amproiñ an hent-se.


An deskadurezh uhel

Kelenn

E 1997 e oa bet digoret **Kelenn**, ar greizenn stummañ war ar bedagogiezh evit danvez kelennerien ar skolioù divyezhek dre soubidigezh (Diwan). Ur stummadur teorikel a vez roet ha prientet e vez ar studierien da dremen ur genstrivadeg.

Abaoe 2005 e vez kinniget gant Kelenn ur stummadur ur bloavezh evit peurzeskiñ ar yezh¹². Pal ar stummadur-se zo kreskiñ an niver a zanvez skolaerien divyezhek e Diwan.

Emdroadur an niver a studierien e Kelenn eus 2003/2004 da 2009/2010




Trumm e oa digresket ar sifroù e 2002 (d'ar mare ma oa bet nac'het enframmatadur ar skolioù dre soubidigezh en deskadurezh publik) ha chomet int heñvel abaoe an diagnostik kozh endro da 60 den enskrivet, well-wazh. Ne weler ket emdroadurioù bras er grafik a-us abaoe 2003 ; tuadurioù zo kentoc'h. Tuet da zigreskiñ emañ an niver a zanvez kelennerien kentañ derez. Chalus eo pa vez ezhomm kavout kelennerien en abeg da ziorren al lec'hioù kelenn. An niver a gelennerien eil derez, eus e du, a ya kentoc'h war greskiñ er bloavezhioù diwezhañ.

Skol-veur Breizh-Izel (SBI)

E **kreizenn skol-veur Pêr Jakez Helias** (skourr Kemper SBI) e vez kinniget un danvez dibab brezhoneg d'ar studierien a-hend-all.

¹² Dont a ra ar stummadur-se da-heul un diplom « Barregezh war ar brezhoneg » a veze kinniget gant Kelenn ha Skol-veur Breizh-Izel e Kemper etre 2002 ha 2005.

Emdroadur an niver a studierien a heuilh an danvez dibab e kreizenn skol-veur Pêr Jakez Helias eus 2003/2004 da 2009/2010



Goude bezañ bet en e barr e 2005 gant 41 studier eo digresket an niver a studierien a heuilh an danvez dibab ha distroet eo d'al live ma oa e 2003.

Da-heul ar c'henemglev bet sinet e deroù 2009 gant SBI ha Kuzul-rannvro Breizh ez eus bet lakaet e plas un unvez kelenn "prientiñ ar c'henstrivadegoù divyezhek". Digor eo ar vodulenn dreuz-se da holl studierien vrezhonek kevrennoù SBI adalek eil c'hwec'hmiziad bloavezh kentañ an Aotreegezh, hervez ar c'henemglev, met n'eo ket bet lakaet an dra-se e pleustr e kreizenn skol-veur Kemper.

Ar c'helenn d'an oadourien

Tri doare da zeskiñ a vez kinniget d'an oadourien hiziv an deiz : kentelioù noz (kinnig a ra an darn vrasañ eus ar frammoù un eurvezh hanter kelenn bep sizhun), stajoù ha kentelioù dre lizher.


Gant Mervent eo frammet ar c'hinnig kentelioù noz er vro, alies e kenlabour gant kevredigezhioù lec'hel.

An darn vrasañ eus ar c'hentelioù noz hag an holl stajoù kinniget e bro Gerne a vez meret gant frammoù ezel eus **DAO** (Deskiñ d'an Oadourien). Tachennoù labour ar gevredigezh-se eo ar bedagogiezh, an dafar kelenn, titouriñ an deskidi, stummañ ar gelennerien, micherelaat anezho koulz hag an hentadoù deskiñ.

Tost da 20 gelenner a gelenn brezhoneg d'an oadourien er vro : 12 den a vez gopret evit en ober, 5 den a vez digollet ha 2 gelenner a youl-vat zo ouzhpenn. 4 fost-labour KILA¹³ hor boa renablet gant Mervent e 2006.

Kentelioù noz

Dasparzh an niver a skolidi er c'hentelioù noz¹⁴ – Bloavezh-skol 2009/2010



Pemp bloaz zo e oa bras-tre pouez Kemper er sifroù, ha dale a oa gant poloù all ar vro (kinnig ebet e Kemperle hervez ar roadennoù hor boa da neuze). Bremañ eo brasoc'h ar sifroù e Kemperle eget e Kemper, e Konk-Kerne eget e Douarnenez. Madik eo ar c'hinnig e Pont-'n-Abad bremañ ivez. Gwelet a reer war ar gartenn n'eus kinnig ebet en-dro da Lokorn hag er C'hab da skouer. Evel war tachennoù all eo bihan sifroù KK bro Fouenant e-keñver he foblañs a-hend-all ; warlerc'hiet eo an DPKE-se war gement tachenn a denn d'ar yezh.

¹³ Kevatal da Implijoù Leunamzer (ETP e galleg).

¹⁴ Ar sifroù-se a gaver dre ar munud er stagadennoù p. 47.

Kentelioù brezhoneg zo e **24 c’humun** (29 lec’h deskiñ zo en holl : meur a lec’h zo e kumunioù zo) ha tost holl annezidi an dachenn a c’hell kavout ul lec’h deskiñ dindan 10 km eus o zi, nemet e trowardroioù Lokorn hag e beg ar C’hab.

E-tro 500 a oadourien zo enskrivet er c’hentelioù noz evit ar bloavezh 2009/2010. Un drederenn eus deskidi kentelioù noz Penn-ar-Bed ez eont d’ober. Ha pa vefe digresket ar c’hinnig (29 lec’h deskiñ e-skoaz 37 e 2003) e chom **damheñvel** an niver a zeskidi ouzh ar pezh a oa e 2003 tra m’eo digresket ar sifroù e Breizh e-keit-se. War efedusaat ha war vicherelaat eo aet labour Mervent hag ar c’hevredigezhioù all abaoe an diagnostik kozh : muioc’h a dud a ya betek penn o stummadur eget 6 vloaz zo. Daoust da se n’eo ket kresket an niver a dud enskrivet er c’hentelioù noz (start eo bet distro-skol 2009 gant nebeut a zeraouidi).

Staliet eo da vat ar **stummadurioù war al lec’h labour** er vro a-hend-all : e 2009/2010 ez eus bet stummet 82 den e pemp strollegezh foran gant Mervent (Kuzul-departamant Penn-ar-Bed, KUMUBROK, tiez-kêr Kemper, Kemperle ha Pont-'n-Abad), ar pezh a ro an eil plas da vro Gerne war an dachenn-se goude bro Brest. Kresket mat eo ar sifroù-se e-keñver 2008/2009 gant 31 den ouzhpenn.

Digresket eo an niver a zeskidi e **Kemper** avat : n’eus ket muioc’h eget e **Sant-Brieg** pe Montroulez ha dibaset eo gant Pempoull pe an Alre.


Stajoù

4 framm o deus kinniget stajoù brezhoneg e 2009/2010 : 2 o deus kinniget stajoù dibenn-sizhun bet heuliet gant **68 deskad** (Mervent, Staj brezhoneg Koad Pin), 3 o deus kinniget stajoù ur sizhunvezh heuliet gant **197 den** (Roudour, KEAV, Staj brezhoneg Koad Pin).

Kentañ stummadur hir bro Gerne zo o paouez bezañ krouet gant Roudour e Douarnenez e miz Gwengolo 2009. 7 deskad zo bet en dalc’h kentañ. Tonket eo an doare stummadur-se da ziorren gant kresk ar c’helenn divyezhek da skouer.

272 stajiad a gonted er vro e 2009/2010 eta, da lavaret eo **tost 1/2 nebeutoc’h eget e 2003**.

Dasparzh an deskidi diouzh pad o staj e bro Gerne keñveriet gant re an departamant ha Breizh – Bloavezh-skol 2009/2010



Bras a-walc’h eo lodenn ar vro e dasparzh an deskidi (nemet evit ar stummadurioù hir) met danvez zo da ziorren c’hoazh (eus tu ar stummadurioù dibenn-sizhun, da skouer, anezho stajoù adwelet evit an dud enskrivet e kentelioù noz alies).

Klozadur ar pennad war an deskadurezh

E diagnostik 2004 e oa bet pouezet war dale bro Gerne e-keñver broioù all Breizh-Izel evit an deskadurezh divyezhek. En desped d'ar gwellaennoù zo bet abaoe (digoradurioù, lusk er skolioù-mamm muioc'h eget e lec'h all) e chom ar vro **en a-dreñv e keñver peurrest Breizh-Izel atav** : an dale bet berniet a-raok war an diorren zo pounner e bouez. **Egin ur cheñchamant** a stader memes tra gant 2^l kresk brasañ Breizh etre 2003 ha 2009. **Gallout a ra bro Gerne adtapout he dale war bro Brest**. Danvez zo da ziorren gant pep hentad er c'humunioù bras hag etre. Merzout a reer ivez ez eus c'hoazh nebeut a lec'hioù divyezhek er skolioù prevez.

Pa studier an doareoù all da zeskiñ brezhoneg er skol e veizer ur gudenn a genurzh. En deskadurezh katolik, da skouer, n'eo ket gwall ziorroet rouedad ar skolioù divyezhek, dister e oa ar c'hinnig tañva er skolioù pa oa anezhañ met, eus an tu all, n'eus lec'h all ebet e Breizh m'eo ken diorroet ar c'hentelioù brezhoneg er skolajoù.

Ma voder ar c'helenn divyezhek hag an tañva, ez eus 12% eus skolidi kentañ derez ar vro o deus un darempred bras pe vrasoc'h gant ar yezh. E KK Bro Douarnenez e tizher 36,4% zoken. Siwazh an tañva e-unan n'eo ket a-walc'h evit ober yezherien ampart. Danvez a vefe e bro Gerne da amprouiñ **un hent nevez da vont da vrezhoneger** ma vefe graet al liamm etre an tañva er skolioù, er skolajoù hag ar c'hentelioù yezh adalek ar 4^e klas.

Er-maez eus ar skol ez emdro ar sifroù war an tu fall kentoc'h. Koazhet eo un tamm ar c'hinnig en deskadurezh uhel ha digresket eo an niver a dud deuet a heuilh kentelioù noz pe stajoù. N'eus nemet ar stummadurioù micherel (stummadur hir ha stummadur war al lec'h labour) a ya un tamm war-raok. Nec'hus eo an tuadurioù-se evit emdroadur ar c'helenn divyezhek (diouer a zanvez kelennerien) hag evit lusk ar yezh er gevredigezh dre-vras (re nebeut a dud deuet oberiant c'hoant ganto kas ar yezh war-raok).

Pa groazier kartennoù an holl zoareoù da gelenn e verzer e chom **dibourvez tachennoù zo**, pe tachennoù enno ur c'hinnig strizh-tre. Tachennoù poblet nebeut int a-wechoù (ar C'hab, arvor ar Porzhe, KK Bro-C'hlazik) met re all zo poblet stank a-walc'h evel KK bro Fouenant ha KK bro Konk-Kerne. Nec'hus eo e vefe un digempouez etre toleadoù muioc'h a startijenn enno ha re all a chomfe war-lerc'h da vat. **N'eus ket c'hoazh a lusk hollek er vro**.

Evit ma c'hallfe ar yezh sevel he c'hein e Kerne e rankfe ur miliad a yezherien ampart ouzhpenn bezañ stummet bep bloaz gant an holl zoareoù kelenn. Hiziv an deiz e vez stummet 1 brezhoneger ouzhpenn pa varv 7, well-wazh. Da bal e c'heller lakaat tremen d'**ur feur par da 1 evit 2 a-benn 2020**.

Ar bed foran

Oberourien ar politikerezh yezh er vro

Gallout a ra pep strollegezh foran ober gant ar brezhoneg er vuhez foran. Rediañ a ra al lezenn implijout ar galleg met aotreet eo ober gant ur yezh all asambles gant ar galleg er vuhez foran. Gant an diferadenn barregezh hollek ez a ar strollegezhioù lec'hel en tu all d'ar barregezhioù fiziet enno : n'he deus ket ar Rannvro ur varregezh war ar sevenadur met kas a ra ur politikerezh sevenadurel da benn daoust da se. Gallout a ra pep strollegezh diouzh he live ober muioc'h gant he barregezhioù ha mont hebiou strizhded ar galloudoù fiziet enni oc'h ober gant doareoù all.

E bro Gerne e kaver **ensavadurioù** a gemer ar brezhoneg e kont en ur mod bennak : Ti Kumunioù Penn-ar-Bed¹⁵ (panelloù divyezhek ha stummadur war ar brezhoneg), KEFKAK¹⁶ Kemper (panelloù divyezhek), France Bleu Breizh-Izel.

Stad an divyezhegezh er panellerezh-hent

Tremen 95% eus kumunioù bro Gerne a oa panelloù divyezhek evit mont enno e 2004.

E 1990 e oa bet divizet gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed kregiñ da staliañ ur panellerezh divyezhek war e rouedad hentoù. E 1998 e oa bet divizet staliañ bep tro panelloù e brezhoneg evit ar panelloù nevez staliet. N'eo ket aveet ar rouedad penn-da-benn c'hoazh, met mont a ra an divyezhegezh war-raok ingal. En un drederenn eus ar rouedad e oa staliet panelloù divyezhek e 2009, da lavaret eo 1 000 km a hentoù aveet e Penn-ar-Bed (ur c'hard a oa aveet e 2002).

Koulskoude ne vez ket skrivet stumm brezhonek reizh anvioù ar c'humunioù pa vez heñvel-tre ouzh ar stumm melestradurel. Pa n'eus nemet un diforc'h tired, evel Plouzane/Plouzané da skouer, e oa bet divizet en deroù skrivañ ar stumm brezhonek mat hepken. Ar c'hontrol eo a vez graet bremañ pa ne vez mui lakaet nemet ar stumm gallekaet war wel.

A-hend-all, e oa da vezañ treuzkaset d'an departamantoù ar merañ war darn eus an hentoù broadel gant lezenn an 13 a viz Eost 2004 diwar-benn ar frankizoù hag an atebegezhioù lec'hel. Gallet en dije an diviz-se disoc'hañ war diorren an divyezhegezh er panellerezh war an hentoù-se a vez darempredet kalz gant an dud. Nac'het o deus an departamantoù kemer an hentoù broadel-se e karg evit poent.

Ha pa vefe dizingaloc'h an disoc'h war an dachenn, divizoù a-du gant ar brezhoneg a vez kemeret gant strollegezhioù lec'heloc'h.

Panellerezh-heñchañ divyezhek a vez staliet tamm-ha-tamm gant kumunioù bras evel **Kemper, Douarnenez, Pluguen**, h.a.

Ur studiadenn war an anvioù-lec'h gourc'hemennet gant an **AOCD**¹⁷ a zo bet savet gant an Ofis. Kemeret e vez e kont hiviziken gant kumunioù zo evit reizhañ skritur an anvioù-lec'h pa vez nevesaet panelloù.

¹⁵ CDG29 e galleg.

¹⁶ Kef Kentañ Asurañs Kleñved (CPAM e galleg).

¹⁷ Association Ouest Cornouaille Développement ; enni emañ bodet kumuniezhoù kumunioù ar Vro Vigoudenn, ar C'hab ha Bro Douarnenez, da lavaret eo un 40 kumun bennak.

Politikerezh yezh an departamant

An doareoù da gemer ar brezhoneg e kont


Penn-ar-Bed eo an departamant kentañ e Breizh evit lakaat oberoù a denn d'ar brezhoneg da dalvezout. Ouzhpenn dasparzhañ skoaziadennoù arc'hant e termen programmoù evit kas ar yezh war-raok (war dachenn an embann, an treuzkas, an tañva er skolioù, h.a.).

Estreget war an hentoù e ro departamant Penn-ar-Bed un tamm plas d'ar yezh. Implijet e vez stumm brezhonek anv an departamant (war ar rouedad kirri-boutin ha war logo an departamant). Ober a ra an departamant gant ar yezh en e gehentiñ a-frapadoù (pennadoù er c'hannadig hag el lec'hienn Genrouedad; teuliadoù kehentiñ zo pe skoroù kelaouiñ zo a vez troet).

Ar budjed gouestlet d'ar brezhoneg gant an departamant

Brasoc'h eo budjed Penn-ar-Bed evit ar brezhoneg eget re an departamantoù all atav : tremen 2,3 milion a euroioù evit ar bloavezh 2008, da lavaret eo 2,63€ dre annezad.

Emdroadur dispignoù departamant Penn-ar-Bed evit ar brezhoneg (e €) eus 2003 da 2008



Abae an diagnostik diwezhañ n'eus ket bet emdroadurioù bras gant budjed ar yezh en departamant : etre 78 ha 86% eus an dispignoù-se a vez gouestlet da ziorren kelenn ar brezhoneg.

Dreist d'an departamantoù all emañ perzh Penn-ar-Bed war dachenn ar c'heleñn : harpañ ar c'hevredigezhioù a gas war-raok an divyezhegezh er skolioù (Diwan dreist-holl met

ivez ar c'hevredigezhioù kerent Div Yezh ha Dihun, koulz hag UGB) ha kizidikaat ar skolidi d'ar brezhoneg dre an tañva kinniget er c'hentañ derez publik. Ur programm zo ivez evit skoazellañ ar c'humunioù hag an diazevadurioù foran a genlabour etrekumunel a-benn digeriñ klasoù divyezhek publik. Skignet e vez skoaziadennoù d'ar c'humunioù evit pourchas dafar pedagogel d'ar c'hlasoù divyezhek publik a-hend-all.

Rannet eo budjed an oberoù e-maez tachenn ar c'helenn e Penn-ar-Bed en un doare kempouez a-walc'h : embann, mediaoù, c'hoariva, glad yezhel¹⁸, obererezhioù troskol. A-hend-all e vez broudet ar c'humunioù da ziorren plas ar yezh dre ur programm skoazell : betek 20% eus koust ar studiadennoù war an anvioù-lec'h hag evit ar panellerezh a c'hell bezañ arc'hantet gant an departamant. E 2005 ez eus bet roet lañs d'ar c'houlzad **Klaskerien ha Treizherien Soñjoù** gant ar pal adskoulmañ liammoù etre ar rummadoù.

Kevrat bro

Kevratoù bro liesvloaziek (evit ar marevezh 2006-2012) zo bet sinet gant ar broioù ha Rannvro Breizh e 2006. Ganto e vez steuñvekaet politikerezhioù ar Rannvro dre diriad. 3 goload a ya d'ober ar C'hevtratoù bro.

Bro Gerne eo ar vro nemeti he deus miret ar Chanter 9, da lavaret eo hini ar politikerezh yezh, e-touez an ahelioù labour kinniget gant ar Rannvro. Rakwelet eo en he **C'hevrat bro** gouestlañ arc'hant da greñvaat ha diorren Radio Kerne.

E **stagadenn 2009** Kevrat bro Gerne e vez lakaet e plas gant ar C'huzul-rannvro ur stignad resisoc'h : merket eo e-touez e bennaennoù e vefe talvoudekaet ha brudet yezhoù Breizh. Dre-se e vez roet ur plas d'ar brezhoneg en darn vrasañ eus ar raktresoù zo e stagadenn 2009 ar Gevrat bro (tachennoù labourerezh, tiez an embregerezhioù, kreizennoù bageal, salabadennoù, h.a.).

Lañs he deus bro Gerne war ar broioù all war an dachenn-se. Oberoù evit ar yezh zo rakwelet e 27 raktres diwar 69 : bro menetañ Breizh eo bro Gerne goude bro Treger-ha-Goueloù.


Oberoù ar c'humunioù hag an DPKE

Kumunioù skouer a gaver er vro hag o deus (pe o deus bet) diorroet gwir politikerezhioù yezh : **Pluguen** ha **Douarnenez**. Dek vloaz zo e oa lañs gant **Kemper** met dilañs zo ganti bremañ kentoc'h. Eus an tu all, ur bern kumunioù bras pe bihan n'int ket oberiant c'hoazh e-keñver ar yezh (en o zouez emañ Konk-Kerne, Fouenant, Kastellin, h.a.) ; lec'hiet emaint e **tachennoù ledanoc'h** - evel KK bro Konk-Kerne ha bro Fouenant, anezho toleadoù poblet, pe c'hoazh ar C'hab – ma vez nebeut a oberoù a-du gant diorren ar yezh. Kentoc'h en a-dreñv e oa reter ar vro da vare an diagnostik kozh ivez ; **KK bro Kemperle** zo e-touez an DPKEoù a samm oberoù bremañ : unan eus ar re gentañ bet sinet ar garta **Ya d'ar brezhoneg** e Breizh eo.

Broudañ oberourien ar vuhez sokial hag armerzhel d'ober traoù fetis evit ar yezh eo pal ar c'houlzad Ya d'ar brezhoneg a oa bet roet lañs dezhañ gant an Ofis e 2001. Astennet e oa bet d'ar c'humunioù (ha d'ar frammoù etrekumunel) e 2004. Ur stern evit **diazezañ pe frammañ ar politikerezh yezh lec'hel eo**.

¹⁸ E 2005 en doa roet ar C'huzul-departamant lañs da **gKlaskerien ha Treizherien soñjoù**, ur c'houlzad zo e bal mirout pinvidigezh ar yezh ha broudañ an eskemm etre ar rummadoù yezherien.

Sinerien Ya d'ar brezhoneg er c'humunioù – Miz Genver 2010



E miz Genver 2010 e konted 24 kumun o doa degemeret ar garta Ya d'ar brezhoneg. 9 anezho o doa dibabet al live 1, 14 a oa aet gant al live 2 ha kêr Pont-'n-Abad he doa lakaet al live 3 da bal. Er c'humunioù-se emañ o chom **46,5% eus annezidi ar vro** (152 559 annezad). Kalz sinerien zo e KK bro Kemperle ha KK su ar Vro Vigoudenn, hini ebet e KK bro ar C'hab nag e KK bro Kastellin hag ar Porzhe (anezho DPKEoù n'int ket poblet-stank).

Unan eus toleadoù Breizh ma kaver ar muiañ a gumunioù o deus sinet ar garta eo bro Gerne. Brasoc'h eo lodenn ar c'humunioù o deus da bal tizhout al live 2 amañ eget e lec'h all.

Tenn a ra an oberoù dibabet d'ar pezh a weler e peurrest Breizh, met un tamm stankoc'h eo an oberoù a denn da implijout ar yezh gant ar velestridi. Merzout a reer memes tra n'eus ket bet dibabet alies oberoù a bouez evit an ober gant ar yezh (reiñ da welet splann d'an dud e c'hallont bezañ degemeret e brezhoneg gant ar servijoù-kêr, aozañ un enklask da c'houzout piv a oar brezhoneg e-touez an implijidi-kêr, arc'hantaouiñ stummadur micherel an implijidi-kêr a fell dezho deskiñ brezhoneg pe gwellaat o yezh). Ha n'eus ket skolioù divyezhek en holl gumunioù o deus sinet ar garta.

C'hwec'h **kumun labelaet** a gonted er vro e miz Gouere 2009 (Douarnenez, Plouguen, Kemper, ar Yeuc'h, Lokorn ha Rieg). Daoust da se, **n'eo ket cheñchet kalz endro yezhel ar vro** e-keñver an diagnostik kozh. **Estreget an doareoù boas d'ober gant ar brezhoneg** (panellerezh, skoroù kehentiñ) **eo ral e vefe graet gant ar yezh war tachennoù nevezusoc'h** (degemer, skridoù melestradurel, lidoù).

N'eo ket kumun **Kemper** marc'h-blein ar yezh evel ma oa er bloavezhioù 90. Ur bodad labour zo met n'eus ket c'hoazh a bolitikerezh yezh frammet. Daoust da se, Kemper eo ar gumun nemeti e Breizh he deus embannet ur pal sklaer da-heul dilennadegoù-kêr 2008 : daougementiñ an niver a vugale er skolioù divyezhek a-benn fin ar respetad.

Klozadur ar pennad war ar bed foran

Degouezh dibar ar bloavezhioù diwezhañ-mañ eo kresk an niver a strollegezhioù foran a anavez ar yezh evel ur gwir teul politikerezh publik. Daoust da se, **n'eo ket emdroet kalz endro yezhel bro Gerne e-keñver an diagnostik kozh**. War panneloù o devez tro annezidi bro Gerne da welet ar yezh dreist-holl.

N'eus ket ul lusk hollek da vont war-raok gant ar brezhoneg a dalvezfe evit ar vro dre-vras. Kumunioù evel **Douarnenez** ha **Pluguen** zo (pe zo bet) skouerioù met n'eo ket ken oberiant o amezeien. Evit echuiñ, strizh-kenañ eo plas ar yezh er vuhez foran e Konk-Kerne, Fouenant pe Kastellin.

E-keñver an diagnostik kozh e verzer kentoc'h emdroadurioù war toleadoù zo evel tachenn an **AOCD** m'eo aet war-raok reizhañ skritur an anvioù-lec'h da-heul studiadenn an Ofis (met dizingal-kenañ eo ober ar c'humunioù gant an teuliad-se) pe **KK bro Kemperle** m'o deus divizet kumunioù zo sinañ ar garta Ya d'ar brezhoneg da-heul sinadur an DPKE e deroù 2009. Arouez dihun un tolead hag a oa kentoc'h dale gantañ betek-henn.

Ar gevredigezh keodedel

Perzh pouezus ar bed kevredigezhel

Bro Gerne a zo e-touez ar broioù **oberiantañ** e-keñver **plas ar brezhoneg er gevredigezh keodedel**. Lusket e vez ar vuhez sevenadurel gant emglevioù bro (Ti ar Vro Kemper, Startijenn ar Vro Vigoudenn, Emglev Bro Douarnenez) ha kevredigezhioù bras (Mervent, Daoulagad Breizh, Dastum Bro Gerne, Tud Bro Konk). **N'eo ket aozet kenkoulz ar rouedad kevredigezhel e pep korn eus ar vro avat**; en desped d'al labour kaset da benn gant Taol Kurun, mankoù zo **er reter hag en norzh** peurgetket.

Treuzkas ar yezh

Gallout a reer menegiñ daou ober war an dachenn-se.

Eus tu ar c'hevredigezhioù, un den dave eus Divskouarn¹⁹ zo er vro. Luskañ a ra **emvodoù miziek e brezhoneg diwar-benn ar vugaligoù** gant ur strollad kerent. En-dro da Gemper eo oberiant ar skourr-se, met ken bras eo ar vro ma vefe danvez evit 3 pe 4 skourr enni. Er-maez eus se e vank abadennoù evit **ar c'houbladoù yaouank** (brezhonek, kemmesk pe divrezhonek) a venn **ober gant ar yezh gant o bugale**.

Eus tu an ensavadurioù en deus diazezet ar C'huzul-departamant ur c'houlzad "**Klaskerien ha Treizherien Soñjoù**" a laka an nevezvrezhonegerien da eskemm gant ar vrezhonegerien a-vihanik. Kreskiñ a ra an niver a berzhidi a vloaz da vloaz.

Servijoù d'an dud

Bed ar vugaligoù

Divskouarn a labour evit brudañ ha kas an divyezhegezh abred war-raok (magourioù, skoazellerezed-mamm, strolladoù kerent, h.a.). Krouet ez eus bet ur skourr eus Divskouarn e trowardroioù Kemper e dibenn 2008.

Karta Divskouarn zo ur benveg a vez lakaet e pleustr evit brudañ ha kas ar brezhoneg war-raok er magourioù abaoe diskar-amzer 2007. Ul label a roer d'ar magourioù a ra gant ar brezhoneg mod pe vod. Tri live a zo.

Evit ar poent, ne gontet e bro Gerne **nemet 2 vagouri a ginnig un tañva** d'ar brezhoneg (A La Rue Béole e Konk-Kerne ha Les Diablotins e Kemper).

Ur c'henemglev zo bet sinet etre Divskouarn ha Kuzul-departamant Penn-ar-Bed evit astenn ar c'hinnig war an dachenn-se. Ar pal a vefe kaout 5 magouri ouzhpenn gant un tañva er vro, ha gant Mervent eo e vo lusket an abadennoù (un implijadez eus ar gevredigezh a ouestl un tamm eus hec'h amzer d'ar raktres-se).

Dale a chom e-keñver bro Brest. Diorren da gentañ er c'hêrioù pennañ zo ezhomek (Kemper, Douarnenez, Kemperle, Pont-'n-Abad, h.a.).

¹⁹ Kevredigezh bet krouet e 2005.

Bed ar re gozh

Unan eus ar broioù nemeto ma vez oberoù a sell ouzh **ar re oadet pe ar re glañv** eo bro Gerne. Un nebeud kevredigezhioù a ya war an dachenn-se e-giz **Startijenn ar Vro Vigoudenn**, pe c'hoazh **Mervent**. E kenlabour gant **CIAS ar C'hab** e oa bet roet lañs e 2005 da **abadennoù e brezhoneg** a veze lusket e **tiez retredidi**. Evit abegoù arc'hant, n'en deus ket kendalc'het CIAS ar C'hab gant an ober-se. Seurt abadennoù a vez kinniget gant Mervent atav e pevar zi retredidi stag ouzh Ospital Douarnenez avat (3 e Douarnenez hag 1 e Pontekroaz).

Abadennoù c'hoariva e brezhoneg a vez aozet gant ar c'hevread **UDARPA 29** zo e bal aesaat buhez ar re gozh. Ober a ra war-dro stummadurioù war ar brezhoneg ivez (3 devezh) evit an dud a-youl vat a ya d'ober gweladennoù, dezho da eskemm aes gant an dud kozh.

Gwall dreut eo plas ar yezh e metoù ar servijoù d'an dud war an oad memes tra. Danvez zo evit postoù-labour evit ar vrezhonegerien koulskoude.

Dudi

Dudi evit ar vugale

N'eo ket aet ar c'hinnig war-raok abaoe 2003. Panevet ar c'hampoù aozet gant ar C'humKumBroK (16 perzhiad e Skaer, 16 e Kloar-Karnoed) hag an degemer evit ar vugale e kamp KEAV (35 bugel etre tout), n'eus kinnig dudi ebet er vro. Abadennoù dudi a veze kinniget gant Mervent e Douarnenez pe Fouenant betek 2007 met n'eus ket bet kendalc'het ganto. C'hoarvezet eo ivez e vefe aozet kampoù vakañsoù er vro gant an Oaled e-kerzh hañvezhioù zo. War a hañval eo **kentoc'h digresket ar c'hinnig** e-keñver ar pezh a oa bet displeget en diagnostik kozh tra m'eo kresket e Breizh dre-vras.

Dudi evit an oadourien

War dachenn an dudi evit an dud deuet e kaver amañ an abadennoù boutin (strolladoù kaozeal pe lenn). Gant Ti ar Vro Kemper e vez aozet ur bodad lenn miziek da skouer. Gweladennoù a vez aozet gwech an amzer gant Ti ar Vro e mirdioù Kemper pe gant Dastum Bro Gerne pergen. Abadennoù brezhonek all a c'haller kavout e Porzh Mirdi Douarnenez, e Mirdi an Arzoù-kaer e Pont-Aven, pe c'hoazh e Maner Kernod, ar Greizenn Enklask ha Teuliaouiñ war al Lennegezh dre Gomz, abaoe 2009. Prezegenoù a vez ivez evel ar re aozet abaoe un nebeud bloavezhioù gant Kevredigezh Vrezhon e Kemper, Kafedi Istor.

Kinnigoù divoutinoc'h a gaver e lec'h pe lec'h. Stalioù pe stajoù dizoleiñ liesseurt a vez kinniget gant Mervent abaoe 2004 da skouer : keginañ, dizoleiñ al laboused, an natur, fardañ bara, liorzhañ, h.a. Yoga e brezhoneg a vez kinniget, a-hend-all, gant Kuzul skoazell Skol Diwan Kemperle pe skol yoga an Erge-Vras.

Daoust da se, **n'eo ket liesseurt-tre** ar c'hinnig dudi evit an oadourien ha ne hañval ket bezañ fonnusoc'h eget e 2003. Eus tu Kemperle eo aet an traoù war-raok memes tra gant labour Kuzul skoazell Skol Diwan Kemperle hag ar festival Taol Kurun.

Arvestoù

➤ Strolladoù c'hoariva

Piba, ur strollad c'hoariva brezhonek a vicher nevez, zo bet krouet e Kemper e dibenn 2009. Ur strollad c'hoariva all zo bet krouet nevez zo : **C'hoariva Plon8**. Ur strollad krennarded, Kef Kef Band, zo bet krouet ivez ha Strollad Forst Fouen zo anezhañ bepred. Ar strolladoù all ne hañvalont ket bezañ buhezek ken (Gaia Teatr, Strollad Yann an Aod).

Ur **festival** a veze aozet gant Tud Bro Konk etre 2002 ha 2007, C'hoariva e Kerne. Kenaozet e oa bet ur festival all gant Ti ar Vro Kemper hag ar c'hevread C'hoariva e 2008 hag e 2010.

➤ Filmoù

Filmoù evit ar vugale ha/pe an dud deuet a vez bannet gwech an amzer gant **Daoulagad Breizh** (staliet e Douarnenez). Abaoe 2004 e aoz ar gevredigezh-se troiadoù filmoù bevaat advouezhiet gant **Dizale** evit ar vugale, pergen. Ur c'henlabour zo etre Daoulagad Breizh ha kevredigezhioù lec'hel evit aozañ an abadennoù (Ti ar Vro Kemper da skouer).

852 vugel eus 16 skol o deus kemeret perzh e troiad 2009 gant 11 abaden aozet e bro Gerne. 11% eus hollad ar vugale o deus arvestet ouzh un abaden eus an droiad ez eont d'ober. Kresket eo an niver a berzhidi e-keñver 2005-2006 (+43%), evel e Breizh dre-vras.

➤ Festivalioù

Meur a **festival** a denn d'ar brezhoneg zo er vro : Taol Kurun e trowardroioù Kemperle ha gouelioù an emglevioù Startijenn ar Vro Vigoudenn hag Emglev Bro Douarnenez.

Gouelioù all a ro ur plas brazik a-walc'h d'ar yezh bep taol (Gouel ar Filmoù e Douarnenez, Saloñs Liesyezhek al Levrioù e Pluguen, Pardon ar C'hourenerien e Sant-Kadoù). Mont a ra war-raok an ober gant ar yezh e Gouelioù mor Douarnenez met chom a ra arouezel e Gouelioù Kerne.

Buhez speredel

Bodad “Yezh ha sevenadur Breizh” eskopti Kemper ha Leon (bet krouet e 2001) zo e gefridi kas an ober gant ar yezh war-raok e buhez Iliz an eskopti « el lec'hioù ma vez posupl ha ma vefe mat », el liderezh hag er c'hatekiz da skouer. Gant ar bodad-se e oa bet embannet un notenn anvet “La place de la culture et de la langue bretonnes dans nos rassemblements de prières” e 2004. Dre ma ne oa ket deuet kalz a draoù da-heul ez eus bet lakaet e plas, abaoe deroù 2007, dileuridi lec'hel zo o c'hefridi kas ar brezhoneg war-raok er parrezioù.

Gwall vihan e chom plas ar yezh war lec'hienn an eskopti (ne gaver ket enni renabl an oferennoù brezhonek ken). Ha n'eus stummadur ebet war ar brezhoneg e kloerdioù Breizh. Hiziv an deiz, **ne vefe nemet 4 beleg dindan 50 vloaz a oar brezhoneg e Breizh**.

Unan eus al lec'hioù ma c'halled kavout **oferennoù** miziek e brezhoneg e oa Iliz-veur Kemper e 2003 c'hoazh. N'eus ken nemet da vare Gouelioù Kerne e vez lidet an oferenne e brezhoneg eno bremañ. Ne vez oferennoù brezhonek nemet da-geñver ar pardonioù hag ar gouelioù bloaziek muioc'h-mui.



Klevet e vez ar yezh en ilizoù dre ar c’hantikoù hengounel memes tra. E-touez erbedadennoù bodad “Yezh ha sevenadur Breizh” eskopti Kemper ha Leon emañ an ober gant ar c’hantikoù-se met n’haller ket gouzout resis pegen stank eo an ober-se war an dachenn ha n’eo ket sur ne vefe ket digresket er bloavezhioù diwezhañ.

Ur ral eo kaout tro da gaout **kelennadurezh war ar relijion gristen e brezhoneg** ken. Ne vez kinniget na katekiz nag aluzenerezh ebet e brezhoneg er vro.

Evit echuiñ, teir abadenn vrezhonek sizhuniek a vez e programmoù **skingomz** rouedad RCF an departamant (RCF Rivages).

An embann

Unan eus pemp bro Breizh ma vez embannet ar muiañ a levrioù brezhonek eo bro Gerne gant tiez-embann Al Lanv, Bannoù-Heol, Yoran embanner, Hentoù Glas ha Preder. 11 eus an an 98 levr bet embannet e 2008 a oa e katalog tiez-embann ar vro.

Al Lanv eo ar gelaouenn vrezhonek nemeti a vez embannet er vro, a-hend-all, met pennadoù e brezhoneg a gaver en Ar Men ivez (a vez moulllet bep eil miz e Kemper).

Ur stal levrioù arbennikaet war danvez Breizh a gaved e Kemper, **Ar Bed Keltiek**, met serret eo bet e 2009. Ar stalioù levrioù all eus ar seurt-se a gendalc’h da vont en-dro : **Ar Vro** e Douarnenez hag e Gwaien ha **Penn da benn** e Kemperle.

Lakaet e vez ar yezh war wel e **Saloñs liesyezhek al levrioù evit ar vugale** e Pluguen.

Ar mediaoù

Er skinwel

E bro Gerne e vez degemeret holl abadennoù brezhonek **France 3 Bretagne. Stabil e oa chomet ar sammad programmoù brezhonek abaoe 2003 : kinniget e vez bremañ 1 eur 50 a abadennoù brezhonek war ar chadenn bep sizhun**, da lavaret eo ur c’hardeur ouzhpenn eget e 2003/2004.

Ur chadenn hag a c’hall bezañ degemeret dre ar fun hag al loarell eo **TV Breizh. Da zistro-skol 2008 eo steuziet ar brezhoneg** eus kael ar programmoù.

Skinweliou lec’hel zo o tiwanañ muioc’h-mui dre an SND²⁰, ar fun, ar Genrouedad pe ar gwagennoù hertzian zoken. Da-heul TV Rennes ha TéléNantes e kinnig **Tébéo** (chadenn skinwel lec’hel Penn-ar-Bed a skign abaoe fin miz Du 2009) abadennoù brezhonek en he c’hael programmoù : ouzhpenn skignañ “Dibikouz”, un abadenn 26 munutenn produet gant Brezhoweb evit ar vugale, e produ Tébéo un abadennig pemdeziek dizoleiñ gerioù brezhonek, “Brezhoneg bemdez”.

Diazezet e Kemper, **An Tour Tan** zo bet al lec’hienn Genrouedad kentañ o kinnig abadennoù skinwel divyezhek, “Skinwelweb”. Met digresket eo plas ar brezhoneg tamm-ha-tamm ha paouezet eo an abadennoù e dibenn 2009.

²⁰ Skinwel Niverel Douarel (TNT e galleg).

Er skingomz

Tro-dro da 80 eurvezh a veze skignet bep sizhun e kael programmoù 2008/2009, un tamm nebeutoc'h e kael 2009/2010 (e-tro 75 eurvezh). Kentoc'h stabil eo ar sammad-se e-keñver 2003/2004, pe digresket un tamm.

Goloet eo bro Gerne a-bezh gant abadennoù **France Bleu Breizh Izel** a zo staliet e Kemper, anezhi ar radio lec'hel selaouet ar muiañ. Kemmet eo ar programmoù skignet e-keñver ar pezh e oant e 2004. Kinniget e vez war-dro **17 eurvezh 30 a brogrammoù brezhonek rik** bep sizhun e kael programmoù 2009 ha **25 eurvezh** o kemer e kont **ar programmoù divyezhek**. E 2003/2004 e veze skignet 20 eurvezh bennak a brogrammoù e brezhoneg.

Radio Kerne eo a skign ar muiañ a abadennoù brezhonek (2/3 eus ar programmoù a vez skignet er vro). E Ploneiz emañ, gant pevar implijad leunamzer ouzhpenn hini ar rouedad radioioù "Brudañ ha Skignañ". Skignañ a ra **53 eurvezh 15** a abadennoù brezhonek bep sizhun e 2009. Ne resever ket mat ar radio-se e lodenn reterañ bro Gerne avat.

Kresket eo ar c'hinnig programmoù brezhonek war **RCF Rivages**. Teir abadenñ sizhuniek e brezhoneg a ginnig en e gael 2009/2010 ; mont a reont d'ober **2 eurvezh 30** a abadennoù bep sizhun (4e30 pa vez kemeret e kont an adskignadennoù).

Arvorig FM a c'hall resev annezidi norzh bro Gerne ivez. Skignañ a ra 45 eurvezh 25 a abadennoù bep sizhun.

War-zu ur rouedad skingomz kevredigezhel e brezhoneg

Evit ledanaat o c'hinnig e kenlabour ar skingomzoù kevredigezhel a ginnig abadennoù brezhonek : krouet o deus ur rouedad eskemm abadennoù. Pelloc'h eget eskemmañ abadennoù eo aet an 2 skingomz vrezhonek, Arvorig FM ha Radio Kerne : rannañ a reont o barregezhioù en ur genbroduñ programmoù.

Gant ar gevredigezh **Brudañ ha skignañ** a vod ar 4 radio kevredigezhel lec'hel ez a en-dro ar c'henlabour-se. Evel-se ez eus deuet da wir ur raktres keleier evit Breizh-Izel e deroù 2010. 5 kazetenner a labour eno, harpet gant Kuzul-rannvro Breizh.

An teknologiezhioù nevez o harpañ ar skingomz e brezhoneg

Stankoc'h eo deuet ar c'hinnig programmoù da vezañ a-drugarez d'ar Genrouedad. Gallout a reer selaou holl brogrammoù Radio Kerne hag Arvorig FM war-eeun enlinenn (dre al lec'hienn Stalig abaoe miz Gwengolo 2004 ha dre An Tour Tan abaoe deroù 2005). Tost holl abadennoù brezhonek France Bleu Breizh Izel a c'haller podskignañ. Gallout a reer selaou "Keleier Breizh" enlinenn ivez war lec'hienn ar skingomz.

Marc'had al labour


E-kerzh nevezamzer 2006 en doa graet servij Arsella an Ofis un enklask war "Ar postoù-labour hag ar brezhoneg".

Gant **tremen 105 post-labour KILA brezhonek** renablet ez eo Kerne **an 2^l bro ma kaver ar muiañ a dud a labour e brezhoneg** goude bro Brest. Tremen 2 wech muioc'h a bostoù brezhonek zo e bro Brest pa n'eus nemet un diforc'h a 17,6% etre poblañs an 2 vro. Lañs diorren ar rouedad skolioù divyezhek e bro Brest zo kaoz eus an diforc'h-se.



Pa urzhier ar broioù diouzh feur ar postoù brezhonek dre annezad emañ bro Gerne en 8^{vet} renk goude bro Montroulez pe bro Pondi.

Dasparzh ar postoù-labour diouzh ar rumm micher e bro Gerne d'ar 1^{añ} a viz Genver 2006



*Damheñvel eo dasparzh ar postoù-labour dre rumm micher amañ ouzh ar pezh eo e peurrest Breizh, met 2 dachenn a zeu muioc'h war wel : **ar mediaoù** (a-drugarez d'ar skingomzoù) hag an hollad **greanterezh, artizanerezh ha kenwerzh**.*

Unan eus ar broioù m'emañ ar postoù en o liesseurtañ eo, goude bro Roazhon, bro Kornôg Kreiz-Breizh ha bro Gwengamp (69% eus ar postoù a gaver e bed ar c'heleñn e-skoaz 73 % e Breizh dre-vras). Abaoe 2006 e tle ar sammad bezañ kresket eus un 20 post bennak. Chom a ra lodenn tachennoù zo en a-dreñv evel ar servijoù d'an dud (magourioù dreist-holl) hag an dudi.

Digempouez zo dre ar vro a-hend-all : estreget ar postoù kelennerien divyezhek, ar postoù all zo kreizennet e KTK Kemper-Kumuniezh, er Vro Vigoudenn hag e Douarnenez.

An armerzh


E 2001 e oa bet roet lañs d'ar c'houlzad Ya d'ar brezhoneg. E miz Meurzh 2010 e oa sinet gant 652 framm.

Gant 176 siner Ya d'ar brezhoneg ez eo bro Gerne **ar vro 1^{añ}** war an dachenn-mañ (pell dirak bro Brest enni 86 siner e 2008) : tremen 1/4 eus sinerien an emglev zo e Kerne. Sinerien niverus a zo deuet dre m'eo bet douget an emglev gant tud eus ar vro ivez (Startijenn ar Vro Vigoudenn, KKG29²¹, kumun Pluguen). Koulskoude, n'eo ket emdroet kalz an niver a sinerien e-keñver 2004 (17 ouzhpenn) ha ne gonter ket kalz a frammoù labelaet er vro : evit ar poent, n'eus nemet **Ti Kumunioù Penn-ar-Bed**²² he deus tapet ul label (met unan eus ar re nemeto o kaout al live 2 eo memes tra).

²¹ Kambr Kenwerzh ha Greanterezh (CCI e galleg).


²² CDG e galleg.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre gumun – Miz Meurzh 2010



War ar gartenn-mañ e verzer da gentañ an tachennoù bet meneget dija el lodenn a denn da bed al labour : KTK Kemper-Kumuniezh, ar Vro Vigoudenn ha Douarnenez.

Dasparzh sinerien Ya d'ar brezhoneg dre rummad evit bro Gerne – Miz Meurzh 2010



Tennañ a ra kalz an dasparzh-mañ da hini Breizh nemet eo bihanoc'h plas ar bed sevenadurel, ha brasoc'h hini an armerzh (tremen an hanter eus an hollad).

Ar bed kevredigezhel breizhek eo en deus douget an oberoù pleustrekañ evit lakaat ar brezhoneg war wel (yezh labour ha yezh kehentiñ), en o zouez an emglevioù bro (Ti ar Vro Kemper, Startijenn ar vro vigoudenn, Emglev Bro Douarnenez), kevredigezhioù sevenadurel a bouez (Dastum Bro Gerne, Féa, Daoulagad Breizh ha Gouel Filmoù Douarnenez) frammoù kelenn (Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien ha Mervent), mediaoù (France Bleu Breizh Izel, Radio Kerne, An Tour Tan) ha tiez-embann (Al Lanv). Oberoù niverus zo bet lakaet da dalvezout gant ur framm publik, Ti Kumunioù Penn-ar-Bed, hag un embregerezh, Kerne Elagage, ivez, koulz war dachenn ar c'hehentiñ ha war dachenn ar stummañ diabarzh. N'eo ket bet ken youlek ar frammoù all.

Klozadur war ar gevredigezh keodedel

Ur rouedad kevredigezhioù breizhek solut zo e bro Gerne. **N'eo ket emdroet kalz endro yezhel ar vro e-keñver an diagnostik kozh** koulskoude. En a-dreñv emañ tachennoù ar buheziñ hag an diduiñ : magourioù, obererezhioù dudi sizhuniek evit ar vugale (bras eo poblañs ar skolioù divyezhek er vro). Liesseurtoc'h e c'hallfe bezañ ar c'hinnig dudi evit an dud deuet (ar c'hinnig zo anezhi a denn d'ar glad sevenadurel ha naturel alies). Bihan eo plas ar yezh er-maez eus an dachenn sevenadurel vreizhek, dre-vras.

Kentoc'h stabil eo chomet plas ar yezh war an tachennoù all (mediaoù, embann). Dre-vras, **n'eo ket treuzfurmet tres ar vro** e-keñver 2004.

Er penn a-raok e-keñver **plas ar brezhoneg en armerzh** emañ bro Gerne memes tra (bed al labour, sinerien Ya d'ar brezhoneg). Un diazez solut evit astenn bezañs ar yezh er vuhez pemdeziek eo.

Klozadur

Bras eo danvez da ziorren ar vro : adlañs zo gant ar c’helenn divyezhek abaoe 2005 met da vezañ klokaet e meur a lec’h (Kemper, Kemperle, Douarnenez, Pont-n-Abad, Konk-Kerne, Kastellin, Rosporden). N’eus ket kalz a cheñchamantoù e-keñver 2003 war an tachenoù all.

Dibarderioù bro Gerne

Dibar eo stad ar brezhoneg e bro Gerne dre ma kaver enni mesk-ha-mesk tachenoù o tiorren ha tachenoù all nebeut a lañs ganto.

War dachenn ar c’helenn divyezhek, da skouer, e chom bro Gerne en a-dreñv e-keñver peurrest Breizh-Izel gant ur c’hinnig distank ha stadegoù izel (e-keñver bro Brest, da skouer). Treut eo ar c’hinnig dudi ivez ha n’eo ket aet war-raok an niver a zeskidi deuet d’o oad.

En enep, muioc’h a hentennoù divyezhek a vez digoret er bloavezhioù diwezhañ, hag ar vro gentañ war dachenn ar c’hentelioù en eil derez eo. Ur spered a-du gant ar yezh a verzer er strollegezhioù foran hag e bed an armerzh ha pa chomfe an oberoù pleustrek war dachenn ar panellerezh dreist-holl.

Dizingal eo al lusk diouzh al lec’h ivez. An dachenn virvidikañ eo an tric’horn a vod KTK Kemper-Kumuniezh, ar Vro Vigoudenn ha Douarnenez. Eus tu ar reter ez eus birvilh e bro Gemperle er bloavezhioù diwezhañ-mañ. An toleadoù all a chom muioc’h en a-dreñv (ar C’hab ha KK bro Kastellin hag ar Porzhe, Konk-Kerne Kumuniezh, KK bro Fouenant ha KK Bro-C’hlazig).

Evit ar poent, n’eo ket kempouezet an niver a yezherien a varv (war-dro 1 000 den bep bloaz) **gant an niver a yezherien stummet.** Estreget er panellerezh divyezhek **ne vez ket gwelet kalz a vrezhoneg en endro stroll ha pemdeziek.**

Ar palioù kentañ da dizhout eo : frammañ diorren ar c’helenn divyezhek ha lakaat muioc’h ar yezh war wel er vuhez pemdeziek.

Derc'hel soñj...

Sifrouù pennañ

- E-tro **140 brezhoneger** a vez stummet bep bloaz tra ma varv **tremen ur miliard a yezherien** e-keit-se.
- Etre 11 ha 12,5% eus ar boblañs a ouije brezhoneg e 2009 (**etre 35 000 ha 40 000 yezher**).
- Tremen 10 000 yezher a vije aet d'an anaon eno etre 1999 ha 2009.
- Tremen **5 700 skoliad** a heuilh kentelioù brezhoneg pe e brezhoneg eus ar skol-vamm d'al lise.
- 10,2% eus skolidi divyezhek Breizh zo enskrivet e bro Gerne.
- Da 3,1% e sav ar feur skoliata en hentad divyezhek evit ar c'hentañ derez.
- 8,7% eus poblañs ar skolioù kentañ derez o deus un **tañva** d'ar brezhoneg.
- 5,3% eus skolidi an eil derez a heuilh **kentelioù brezhoneg** (8,3% er prevez, 3,3% er publik).
- 46,5% eus ar skolidi **eil derez prevez** a heuilh kentelioù brezhoneg en Akademiezh Roazhon a gaver e bro Gerne.
- Tremen **800 den deuet** a zesk brezhoneg.
- 80 studier o deus bet **kentelioù brezhoneg** en deskadurezh uhel.
- E-tro 500 a oadourien o deus heuliet **kentelioù noz** e 2009/2010.
- E miz Du 2009 e oa 24 c'humun o doa degemeret ar garta **Ya d'ar brezhoneg**.
- 46,5% eus annezidi ar vro zo o chom er c'humunioù-se.
- **2 vagouri** a ginnig un tañva d'ar brezhoneg.
- 2 framm a ginnig **klasoù dizoleiñ pe kampoù vakañsoù brezhonek** (67 den yaouank o deus kemeret perzh eno e 2009). N'eus kinnig dudi ebet a-hend-all.
- **105 post-labour brezhonek** bennak a oa bet renablet e 2006.

Deskadurezh

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ An holl zoareoù da gelenn zo ▪ Muioc'h a glasoù divyezhek zo bet digoret er bloavezhioù diwezhañ ▪ Kreñvoc'h eo lusk kreskiñ ar c'helenn divyezhek abaoe 2006 eget e deroù ar bloavezhioù 2000 ▪ Danvez zo da ziorren gant an hentadoù divyezhek ▪ Ur stignad kizidikaat a bouez zo er c'hentañ derez ▪ Ar vro gentañ war dachenn ar c'helenn brezhoneg en eil derez eo ▪ Kresket eo an niver a skolajidi kizidikaet ▪ Frammet eo ar c'hinnig kelenn d'an oadourien ▪ Stummadurioù war al lec'h labour zo ▪ Danvez dibab brezhoneg a vez kinniget e Skol-veur Kemper ▪ Stummadur hir kentañ ar vro zo o paouez digeriñ 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Ne vez ket stummet trawalc'h a yezherien evit kempouezañ ar c'holl eus tu ar re gozh ▪ En a-dreñv emañ bro Gerne e-keñver peurrest Breizh-Izel evit feur ar c'helenn divyezhek er c'hentañ derez ▪ Distank-tre eo ar c'hinnig divyezhek er c'hentañ derez ha kreizennet eo bet e Kemper en eil derez ▪ N'eus ket ken eus an tañva er c'hentañ derez en deskadurezh katolik ▪ Digresket eo an niver a liseidi stummet ▪ Ne gresk ket an niver a oadourien a heuilh kentelioù noz ha daouhanteret an niver a stajidi 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Kalz dale zo bet berniet gant ar vro e-keñver diorren ar c'helenn divyezhek ▪ An tañva (er skol hag er skolaj) n'eo ket a-walc'h e-unan evit stummañ yezherien ▪ Kudennoù arc'hantaouiñ a vir da astenn an tañva er skolioù ▪ N'eo ket kenurzhiet an tañva er c'hentañ derez hag ar c'hentelioù en eil derez en un hentad deskiñ ▪ Ar c'henemglev sinet etre Skol-veur Breizh-Izel hag ar C'huzul-Rannvro ne vez ket lakaet da dalvezout e kreizenn Kemper 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Digeriñ 3 lec'h divyezhek bep bloaz ▪ Digeriñ skolioù divyezhek er c'humunioù ma n'eus ket c'hoazh (da skouer e Fouenant, Molan, Rosporden, su ar Vro Vigoudenn, h.a.) ▪ Astenn ar c'hinnig e skolioù all er c'humunioù ma'z eus ur skol divyezhek c'hoazh (er c'hêrioù brasañ da gentañ-penn) ▪ Aozañ ar c'hendalc'h en eil derez e kêrioù pennañ ar vro ▪ Astenn an tañva d'ar brezhoneg en holl skolioù ▪ Diorren, brudañ hag aesaat ar c'hentelioù brezhoneg en eil derez ▪ Frammañ un eil hent da vont da vrezhoneger gant an tañva hag ar c'hentelioù eus ar skol-vamm d'al lise er publik hag er prevez ▪ Brudañ ar stummadurioù war ar brezhoneg evit an dud deuet hag ar fred stag outo ▪ Astenn ar stummañ dibaouez er frammoù publik da gentañ-penn (tiez-kêr, DPKE, frammoù sevenadurel publik pe ledpublik) ▪ Astenn ar c'hinnig stummadurioù hir ▪ Derc'hel ur c'hinnig kentelioù noz ledan war an dachenn hag e karterioù ar c'hêrioù bras ▪ Stummañ kelennerien divyezhek ouzhpenn ▪ Lakaat ur vodulenn dreuz e plas e Skol-veur Kemper

Buhez foran

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ Sistematik eo an divyezhegezh pa vez hizivaet ar panelloù war an hentoù-departamant ▪ Liesseurtoc'h ha kreñvoc'h eo politikerezh yezh Penn-ar-Bed eget hini an departamantoù all ▪ Bro Gerne eo ar vro nemeti he deus miret ar politikerezh yezh en he c'hevrat bro ha kemeret e vez ar yezh alies e kont en he stagadenn 2009 ▪ Kumunioù zo o deus ur gwir politikerezh yezh evit ar brezhoneg hag 1/4 eus ar c'humunioù o deus sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg ▪ KK bro Kemperle he deus sinet ar garta Ya d'ar brezhoneg 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ N'eo ket cheñchet kalz endro yezhel bro Gerne e-keñver an diagnostik kozh ▪ Estreget war ar panneloù, ne vez ket gwelet kalz brezhoneg (er c'hehentiñ, en degouezhioù ofisiel, en teulioù melestradurel, en degemer, h.a.) ▪ N'eus tost lec'h ebet d'ar yezh er vuhez foran e poloù zo eus ar vro c'hoazh (Konk-Kerne, Fouenant, Kastellin) ▪ N'eus ket kement a lusk gant Kemper ha gwechall ▪ Toleadoù poblet n'en em ouestlont ket c'hoazh (trowardroioù Konk-Kerne pe Fouenant) ▪ Kalite an divyezhegezh a c'hallfe bezañ gwellaet a-wechoù (vioù koukoug, kinnig digempouez an 2 yezh) ▪ Er panellerezh hent eo aet an divyezhegezh war-raok, met n'eo ket ken stank er savadurioù foran 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ N'eus ket ul lusk hollek da vont war-raok gant ar brezhoneg ▪ An departamant m'eo emdroet an nebeutañ budjed ar brezhoneg er bloavezhioù diwezhañ eo ▪ N'eus testenn dave ebet evit politikerezh yezh an departamant ▪ Daoust ma ne vir ket a ober gant ur yezh all ouzhpenn ar galleg, mellad 2 ar Vonreizh a laka un harz da ziorren ar yezh alies en abeg d'ar raksoñjoù zo liammet outi ▪ N'eus ket brezhoneg war an hentoù broadel ▪ Ur sell "glad" zo gant darn eus ar pennadurezhioù lec'hel war ar brezhoneg re alies c'hoazh 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Engouestlañ mioc'h ar frammoù etrekumunel ▪ Reizhañ skritur an anvioù-lec'h er c'humunioù ▪ Kenderc'hel da gloaat ar gweledva yezhel foran (panellerezh-heñchañ, plakennoù-straed, panellerezh er savadurioù hag aveadurioù foran, h.a.) o kregiñ gant ar c'hêrioù bras ▪ Kinnig heñvel an 2 yezh war ar panneloù ▪ Lakaat e plas politikerezhioù treuz

Buhez keodedel

Tuioù kreñv	Tuioù gwan	Skoilhoù	Erbedadennoù
<ul style="list-style-type: none"> ▪ Diorroet, frammet ha micherelaet eo ar bed kevredigezhel ▪ Gant ur strollad kerent e vez emvodoù miziek e brezhoneg diwar-benn ar vugaligoù ▪ O tiwanañ emañ an oberoù kentañ war dachenn ar brezhoneg a-raok ar skoliata (kizidikaat e magourioù zo) ▪ Oberoù a sell ouzh ar re oadet a vez kaset da benn ▪ Ur strollad c'hoariva brezhonek a vicher nevez zo, Piba ▪ E Douarnenez emañ staliet ar gevredigezh Daoulagad Breizh ▪ Meur a festival a denn d'ar brezhoneg zo ▪ Unan eus ar 5 bro ma vez embannet ar muiañ a levrioù brezhonek ▪ Holl abadennoù brezhonek France 3 a resever er vro ▪ Tébéo, chadenn lec'hel Penn-ar-Bed, a ginnig abadennoù brezhonek ▪ Unan eus tachennoù Breizh ma c'heller klevet ar muiañ a abadennoù brezhonek er skingomz eo bro Gerne ▪ An eil bro ma kaver ar muiañ a dud a labour e brezhoneg ▪ Digoroc'h d'ar brezhoneg eget e lec'h all e hañval bed an armerzh bezañ 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ N'eo ket ken frammet ar rouedad kevredigezhel er reter hag en norzh ▪ N'eus magouri vrezhonek pe divyezhek ebet ▪ Dister eo ar c'hinnig dudi evit ar vugale ha kentoc'h digresket eo ▪ N'eo ket liesseurt-tre ar c'hinnig dudi evit an oadourien ▪ Nebeut a frammoù sevenadurel publik a ra gant ar brezhoneg ▪ Ar gouelioù heverkañ ne lakaont ket kalz ar yezh war-raok ▪ Bed an touristerezh ne implij ket ar yezh evel un elfenn desachañ ▪ Bihanaet eo plas ar brezhoneg en oferennoù ha ne vez ket kinniget katekiz e brezhoneg d'ar re yaouank 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Re strizh e chom plas ar brezhoneg er-maez eus an dachenn sevenadurel vreizhek, ne vez ket gwelet kalz gant an holl dud en o buhez pemdez ▪ E metoù ar c'helenn ec'h enfreder ar vrezhonegerien dreist-holl c'hoazh ▪ Dinerzh un tamm eo an eskopti e-keñver ar yezh 	<ul style="list-style-type: none"> ▪ Brudañ an divyezhegezh abred er gwilioutioù ▪ Astenn plas ar yezh en endro an holl (aveadurioù publik ha prevez pergen) ▪ Diazezañ magourioù er c'hêrioù pennañ a-benn 2 pe 3 bloaz ▪ Stummañ hag enfredañ animatourien dudi (war an arzoù ha war ar sportoù) evit obererezhioù sizhuniek e poloù ar vro koulz hag evit kampoù vakañsoù niverusoc'h ▪ Cheñch skeudenn ar yezh e penn ar re yaouank en ur ginnig dezho abadennoù modern pe darvoudoù a glot gant o freder ▪ Diazezañ abadennoù reoliek a bledfe gant ur sport pe gant un arz bennak evit an dud deuet ▪ Skignañ gwelloc'h al levrioù hag ar c'hazetennoù brezhonek ▪ Kizidikaat embregerezhioù ha frammoù n'int ket anavezet evel "breizhek" ▪ Broudañ an implijerien da enfredañ brezhonegerien ▪ Kendrec'hiñ pennoù an aveadurioù prevez da ziorren an divyezhegezh

Stagadennoù

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre live – Distro-skol 2009

	Skol-vamm	Skol-gentañ	Skolaj	Lise	Hollad
Banaleg	42	26	0	0	68
Brieg	46	24	0	0	70
Douarnenez	56	54	0	0	110
Erge-Vras (an)	41	24	0	0	65
Kastellin	17	6	0	0	23
Kemper	142	146	183	17	488
Kemperle	37	21	0	0	58
Konk-Kerne	22	25	0	0	47
Ploneour-Lanwern	20	0	0	0	20
Plozeved	56	62	0	0	118
Plozeved	34	16	0	0	50
Pont-'n-Abad	25	28	0	0	53
Skaer	26	31	0	0	57
Tregon	20	17	0	0	37
Tremeven	40	22	0	0	62
Bro Gerne	624	502	183	17	1326

Sifroù ar c'heleñn divyezhek dre gumun ha dre hentad – Distro-skol 2009

	Diwan	Hentad publik	Hentad prevez	Hollad
Banaleg	50	18	0	68
Brieg	0	70	0	70
Douarnenez	0	110	0	110
Erge-Vras (an)	0	65	0	65
Kastellin	23	0	0	23
Kemper	296	141	51	488
Kemperle	58	0	0	58
Konk-Kerne	0	47	0	47
Ploneour-Lanwern	0	0	20	20
Plozeved	0	118	0	118
Plozeved	0	50	0	50
Pont-'n-Abad	0	0	53	53
Skaer	0	57	0	57
Tregon	37	0	0	37
Tremeven	0	62	0	62
Bro Gerne	464	738	124	1326

Feurioù ar c'heledd divyezhek dre gumun ha dre live – Bloavezh-skol 2008/2009

Kumun	Skol-vamm	Skol-gentañ	Ishollad kentañ derez	Skolaj	Lise	Hollad
Banaleg	8,66%	7,44%	7,91%			4,78%
Brieg	13,44%		7,77%			4,17%
Douarnenez	11,31%	5,90%	7,97%			3,46%
Erge-Vras (an)	7,37%	6,19%	6,62%			6,62%
Kastellin	3,98%	0,73%	1,96%			0,53%
Kemper	5,39%	4,09%	4,61%	3,87%	0,21%	2,66%
Kemperle	5,99%	1,52%	3,17%			1,09%
Konk-Kerne	2,99%	1,63%	2,16%			0,96%
Ploveur	36,31%	27,00%	30,71%			30,71%
Plozeved	30,84%	7,35%	17,70%			8,83%
Pont-'n-Abad	6,88%	4,00%	5,08%			1,31%
Skaer	13,17%	10,47%	11,62%			7,16%
Tregon	8,84%	6,10%	7,19%			4,74%
Tremeven	34,55%	14,04%	24,11%			24,11%
Bro Gerne	4,19%	2,45%	3,15%	1,02%	0,12%	1,98%

Feur ar c'heledd divyezhek dre gumun ha dre vloavezh er c'hentañ derez etre 1999 ha 2008

	1999	2000	2001	2002	2003	2004	2005	2006	2007	2008
Banaleg	9,6%	11,5%	11,3%	10,0%	8,0%	8,9%	9,2%	8,4%	9,7%	7,9%
Brieg								3,2%	5,5%	7,8%
Douarnenez	3,9%	4,3%	4,6%	4,8%	4,3%	5,1%	5,7%	5,5%	6,9%	8,0%
Erge-Vras (an)				2,7%	4,3%	4,9%	5,3%	6,4%	7,3%	6,6%
Kastellin									1,1%	2,0%
Kemper	2,5%	2,9%	3,3%	3,5%	3,7%	3,9%	4,2%	4,5%	4,7%	4,6%
Kemperle	3,7%	3,7%	3,2%	3,2%	2,8%	3,0%	3,1%	3,1%	2,9%	3,2%
Konk-Kerne	0,9%	1,4%	2,3%	1,6%	1,3%	1,9%	1,8%	1,8%	1,7%	2,2%
Ploveur	17,6%	17,2%	20,4%	20,5%	19,4%	21,5%	23,1%	25,9%	28,9%	30,7%
Plozeved									9,6%	17,7%
Pont-'n-Abad	4,2%	4,4%	4,7%	5,7%	5,3%	5,2%	4,9%	5,2%	5,2%	5,1%
Skaer	6,9%	6,8%	8,0%	9,6%	10,1%	10,6%	9,8%	10,1%	11,5%	11,6%
Tregon	11,0%	11,3%	9,6%	10,6%	9,1%	9,8%	7,7%	7,4%	6,8%	7,2%
Tremeven							9,7%	12,1%	18,3%	24,1%
Bro Gerne	1,8%	2,0%	2,1%	2,2%	2,2%	2,4%	2,4%	2,6%	2,9%	3,1%

Sifroù ar c'hentelioù noz dre gumun ha dre live e 2009/2010

	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5	Emvarrekaat ha pleustriñ	Hollad
An Erge-Vras			9		9	9	27
Ar Forest-Fouenant						10	10
Banaleg	8	6					14
Brieg	7	7	7				21
Douarnenez	7	9	9				25
Eliant	10	10					20
Gwaien		5			6		11
Kastellin			4				4
Kemper	20	18	6		6	13	63
Kemperle	48	5	10	8	15	10	96
Kerien	6	8					14
Konk-Kerne	8	13	7				28
Landudeg	6						6
Molan		14					14
Ploeneg			6		5		11
Ploneour-Lanwern		6	6				12
Ploudiern		7				10	17
Ploveilh	8	7					15
Ploveur	10						10
Pont-'n-Abad	19	12	7			10	48
Rosporden		8					8
Skaer	4						4
Tregon	7						7
Tremeven	5	7					12
Bro Gerne	173	142	71	8	41	62	497

Levrlennadur

- BAUDEQUIN I., Genver 2008. L'évolution de la population des 21 pays bretons de 1999 à 2005. Octant, Roazhon, 111, 17-21.
- EBSSA (emb.), Gwengolo 2003. L'espace breton. Les dossiers d'Octant, Roazhon, 45, 152 p.
- GREF Breizh (emb.), Mezheven 2007. Tableau de bord emploi-formation par pays - Pays de Cornouaille. Roazhon, 44 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2007. Ar brezhoneg e-kreiz ar roudour – Eil danevell hollek war stad ar brezhoneg. Roazhon, 135 p.
- Ofis ar Brezhoneg (emb.), 2004. Diagnostik war stad ar brezhoneg e bro Gerne. Roazhon, 25 p.
- Strollegezh Tiriadel Korsika (emb.), 2006. PRDF « Lingua è cultura corsa » - Plan de développement de l'enseignement de la langue et de la culture corses et de son apprentissage tout au long de la vie. Aiacciu, 35 p.
- UBAPAR, 2009, Klasoù hag obererezhioù dizoleiñ /classes et activités de découverte en breton pour les scolaires
- UBAPAR, 2009 Kreizennoù vakañsoù hañv 2007/ séjours enfants et ados en breton Été 2007

Mammennoù

- Arvorig FM
- CFP Brest
- Daoulagad Breizh
- DDEC Penn-ar-Bed
- Departamant Penn-ar-Bed
- Deskadurezh Stad
- Dihun
- Divskouarn
- Div Yezh
- Diwan
- Ensellerezh akademiezh Penn-ar-Bed
- France 3 Bretagne
- France Bleu Breizh Izel
- Gwarez ar Mammoù hag ar Vugale²³ (Kuzul-departamant Penn-ar-Bed)
- Mervent
- Radio Kerne
- Rannvro Breizh
- Rektoriezh Roazhon
- Sked
- Skol-veur Breizh-Izel
- Startijenn ar Vro Vigoudenn
- Taol Kurun
- Tébéo
- Ti ar Vro Kemper
- TV Breizh
- Yezh ha Sevenadur

²³ Protection Maternelle et Infantile (PMI).